




Aodoù Breizh : temptadur ar betoñs en arvor



Vassili Feodoroff

Gant *Splann !* e vez graet ur bilañs resis ha digent eus an artifiñsielaat douaroù war aodoù Breizh. Gant hon enklask e vo diskoachet penaos e c'hell gwechoù zo ar betonereziou tremen dreist al lezennoù kêriekaat, en ur ober o mad eus servijoù ar Stad.

Estreget war aodoù Breizh e vez riskloù bezañ beuzet en Argoad ivez. Ar c'hant metrad kentañ adalek ar mor o deus bet gwelet 10 savadur nevez er c'hwec'h miz kentañ 2024, hag an hanter anezho o talvezout da eil-anezioù, ha kement-mañ daoust m'int bet gwarezet abaoe 1986 gant Lezenn an Aodoù.



10 €

Aodoù Breizh : temptadur ar betoñs en arvor

Enklask bet embanned e miz Genver 2025

Gant *Splann !* e vez graet ur bilañs resis ha digent eus an artifijsielaat douaroù war aodoù Breizh. Gant hon enklask e vo diskoachet penaos e c'hell gwechoù zo ar betonereziou tremen dreist al lezennoù kêriekaet, en ur ober o mad eus servijoù ar Stad.

Estreget war aodoù Breizh e vez riskloù bezañ beuzet en Argoad ivez. Ar c'hant metrad kentañ adalek ar mor o deus bet gwelet 10 savadur nevez er c'hwec'h miz kentañ 2024, hag an hanter anezho o talvezout da eil-anneziou, ha kement-mañ daoust m'int bet gwarezet abaoe 1986 gant Lezenn an Aodoù.

Dindan dek vloaz ez zo tost da 4.000 hektar a zouaroù labour ha naturel zo bet distrujet e kumunioù an Arvor, evit bezañ kêriekaet. Padal betoniñ n'eo ket bepred un doare da reiñ ur vuhez nevez d'ar c'humunioù dre vuzhud : lod o deus gwelet niver o annezidi o vont d'an traoñ daoust da savadurioù nevez savet e-leizh.

Peadra zo da sevel goulennoù diwar-benn evedusted gwirion Lezenn an Aodoù. E 1986 e oa bet votet, hag 20 vloaz war-lerc'h e krog da vezañ lakaet e pleustr da vat. Un diazez lezennel evedus a-walc'h eo evit ar vaered a fell dezho lakaat untermen da artifijsielaat tachennoù o c'humun. Met meur a vank en doare m'eo bet savet al lezenn a ro digarez da diez-kêr zo da dremen e-biou dezhi.

Sifroù ha kartennoù diembann betek-henn a ro tro deomp da sevel bilañs an dek vloaz diwezhañ war aodoù Breizh, pezh a lak war-wel ar mankoù politikel, koulz er strollegezhioù lec'hel hag e-mesk servijoù ar Stad.

Da vare m'emañ ar strollegezhioù lec'hel o sevel goulennoù diwar-benn an doareoù da lakaat e pleustr al lezenn Artifijsielaat Ebet Rik (AER/ZAN) – ar skrid en deus da bal gwareziñ an tachennoù labour-douar ha naturel ac'hann da 2050 – petra a c'heller soñjal diwar ar mankoù hag an dislvaroù a c'hellfe ivez lakaat en arvar evedusted al lezenn nevez-se ?

Jérémie Szpirglas, Denis Vannier

Piv eo Splann !

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet. A-drugarez da zonezoù an dud e c'hall *Splann !* Goprañ kazetennerien da labourat war an hir-dermen hag embann enklaskoù war e lec'hienn internet hag e lizher-kelaouiñ.

LODENN 1

N'EO KET GANT BETOÑS E LAKAER KUMUNIOÙ DA GRESKIÑ

..... pajenn 5

Ouzhpenn 50 kumun eus Arvor Breizh o deus laosket krignat betek mil hektar a zouaroù labour-douar ha takadoù naturel gant savadurioù. Un doare desachañ annezidi nevez.

LODENN 2

N'HELL KET LEZENN AN AODOÙ MIROUT OUZH EMLED AR BETOÑS

..... pajenn 15

Tost da zaou-ugent vloaz goude e oa bet lakaet lezenn an aodoù da dalvezout, e ranker anzav eo aet an taol er c'hleuz : digor marc'had ar sevel ti war an aodoù hag an tornaodoù.

LODENN 3

TRO-KEIN UR C'HÊRIEKAAT HA N'EO KET MESTRONIET KEN

..... pajenn 29

An teulioù hag aktoù kêriekaat a rank tremen ur c'hontroll lezennegezh kemeret e karg gant servijoù ar Stad. Seul daol e ya an dilennidi da gavout repu dindan disglavier ar prefetioù, pezh a ro dezho pep reizhded, hervezo.

LODENN 4

LEZENN ARTIFISIELAAT EBET RIK : A-BOAN BET VOTET, DIJA BET FRAILHET

..... pajenn 41

Gellet a ra ar « maered-saverien » an Arvor bezañ disammet : al lezenn a oa sañset lakaat un termen d'an artifisielaat tachennoù zo bet skoet gant meur a zisdalc'h ha meur a c'houlenn reizhañ a-berzh ar gouarnamant ha kannaded zo.

LODENN 5

PELEC'H ZO BET LAKAET BETOÑS WAR AODOÙ BREIZH ?

..... www.splann.org

A-drugarez d'ur gartenn diembann hag interaktivel, graet gant *Splann!*, e c'haller furchal dre ar munut peseurt douaroù a zo bet artifisialisaet war aodoù Breizh, war hol lec'hienn internet.

Bouest du

Savet eo bet an enklask-mañ a-drugarez d'ur bern diazoù roadennoù bet analizet gant Splann !: aotre sevel, teulioù kêraozañ niveradurezh an EBSSA, BD Topo treuzkemmoù tachennoù, roadennoù kriz eus ar Cerema... Gant an doare-se e c'haller kinnig ur sell dre ar munud war emdroadur an arvor, er savadur tost en ur lakaat sifroù dianav da zont war wel war aodoù Breizh a-bezh.

Hon mammennoù :

- Lec'h ar savadurioù : BD Topo (2014 ha 2024)
- Renk ar c'humunioù war bord an aod : Observatoire des territoires - ANCT
- Trolinenn ar c'humunioù : Admin Express, IGN, miz Du 2023
- Dielloù kêriekaat : Géoportail de l'urbanisme ha OpenDataArchives
- Annezidi : Insee, recensements
- Kêriekaat dre gumun : Cerema
- Patrom tiraozañ an douar : MOS Foncier de Bretagne
- Aotreoù sevel : Ministrerezh an tiriadoù, an ekologiezh hag al lojeiz, SITADEL
- Douaroù gwerzhet : Cerema, Demande des Valeurs Foncières (DVF)
- Eil tiez : Insee, Recensement de la population, Logements et résidences principales en 2020 et Logements et résidences principales en 2014
- Emdroadur an niver a skolidi : Ministrerezh an Deskadurezh Stad : Bloazlevr an deskadurezh 2023 / Niver a skolidi 2015-2019 / Niver a skolidi 2019-2022

An holl skriptoù tretañ roadennoù a c'haller lenn hag adimplijout en o frankiz war Github

En ur venegiñ o tarz (lizhersav CC-by-NA).

Meret eo bet ar roadennoù gant ar yezh Python dreist-holl. Implijet hon eus ivez ar meziant dieub QGIS hag al levr di javascript Mapshaper.

Harpet eo ar c'hartennoù etreoberiat gant al levr di MapboxGL.js. Dont a ra an dalc'had kartennoù eus an IGN hag eus kenobererien OpenStreetMap peurliesañ.

Heulit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

N'EO KET GANT BETOÑS E LAKAER KUMUNIOÙ DA GRESKIÑ

Ouzhpenn 50 kumun eus Arvor Breizh o deus laosket krignat betek mil hektar a zouaroù labour-douar ha takadoù naturel gant savadurioù. Un doare desachañ annezidi nevez, e-keit ma weler niver annezidi ar c'humunioù-se e kenderc'hel da vont war ziskar. Sellomp pizh pezh zo bet c'hwitet.



Vassili Fedoroff

- 】 War ledanaat e ya kumunioù Arvor Breizh, padal ne gresk ket dre ret o foblañs.
- 】 Digreskiñ a ra niver o annezidi zoken gwechoù zo, serriñ a ra ar skolioù ha mont a ra ar c'henwerzhioù da get daoust ar c'hêriekaat o vont war-raok.
- 】 9% eus an aotreoù sevel-ti deroet er c'humunioù war an aod a bled gant eil annezioù ha dre-se e kosha annezidi ar c'humunioù-se.

Distruj an takadoù naturel ha tachennoù labour-douar evit reiñ plas d'ar bitum, d'al lojeizioù ha d'ar c'henwerzhioù : ar priz a ranker paeañ pa fell d'an nen diorren ur gumun, gwelet an annezidi dispakañ, an embregerezhioù krouiñ implijoù. Evel-se e c'heller displegañ e berr gomzoù hentenn ar c'hêriekaet war-gresk, an hentenn « pragmatek » evel ma vez kaset war-raok gant an dilennidi a vez rebechet outo efedoù war an endro zo gant o folitikerezhioù terkañ.

Ma'zeer da heulseurt hentenn diorren, n'heller ket kompren penaos e vez kollet annezidi gant ar c'humunioù-se a vrasañ o zakadoù kêriekaet zo bet o koll annezidi

hag implijoù... Gounezet o c'hlaoustre gant an hanter eus ar c'humunioù war an aod : kresket an takadoù kêriekaet (5 %) d'an nebeutañ e-keit ma vezent o c'hounit annezidi. Alies-mat ez int kêrioù-kreiz pe kêrioù en un tolpad kêrioù, evel An Oriant, Brest pe Gwened.

Ha koulskoude ne zeu ket an diorren lec'hel diwar ar betonerezhioù ha dre vurzhud. Ha lod kêrioù war an aod zo bet war an diskar abalamour d'ar betoñs zoken, evel m'eo bet diskoachet e-doug enklask *Splann !*. Un disoc'h deuet diwar ul labour digent, lec'h m'eo bet kroaziet roadennoù kêraozouriezh ha demografiezh aod

Breizh en dek vloaz diwezhañ (sellit ouzh hor metodologiezh).

C'HWITADENN AR C'HÊRIEKAAT EVIT DESACHAÑ ANNEZIDI

Tapet eo bet Kerlouan, ur gumun eus « Aod ar Mojennoù » (Bro-Bagan) gant froudenn an aotreoù sevel-ti. Kresket eo takadoù kêriekaet ar gumun eus 50 devezh arat dindan 10 vloaz. E fin ar gont e oa tost 200 annezad nebeutoc'h e 2021 eget e 2014. Ur c'hantved hanter zo ne oa ket bet ken nebeut a annezidi e Kerlouan. Sioulloc'h porzh ar skolioù hiriv an deiz : tremenet eo

niver bugale eus ar skol-vamm d'ar CM2 eus 148 e 2015 da 80 en distro 2023. Ha daoust da bromesaoù an douristelezh ez eus bet kollet ur 15 ben-nak a implijoù bloaziek

Tapet eo bet Kerlouan, gant froudenn an aotreoù sevel-ti.

abaoe 2014.

E Sant-Kast-ar-Gwildoù, e-tal Dinan eo aet war-raok ar c'hêriekaet eus 12 hektar war douaroù naturel pe tachennoù labour-douar etre 2014 ha 2020. An disoc'h war an hevelep prantad : nebeutoc'h a annezidi, nebeutoc'h a implijoù, nebeutoc'h a vugale er skolioù. N'eus ken met servij ar c'hêriekaet en deus bet ur c'hresk... war e labour : etre 2013 ha 2023 en deus bet deroet 342 aotre evit sevel savadurioù nevez. Muioc'h eget an niver bet deroet gant kêrioù evel An Alre, Kemperle pe Douarnenez, lec'h ma vez peder gwech muioc'h a dud o chom koulskoude.



Traezhenn Ris e Norzh Douarnenez a oa bet savet a-raok lezenn an aodoù.

E Lokentaz er Mor-bihan, ez eus bet stank obererezhioù war ar madoù di-loc'h (prenañ ha gwerzhañ savadurioù ha tachenoù) en dek vloaz diwezhañ. Etre miz Genver 2013 ha miz Kerzu 2023 ez eus bet deroet tro 500 aotre sevel savadurioù nevez gant an ti-kêr. Biskoazh ne oa bet kement er rannvro e-skoaz poblañs ar gumun (313 aotre evit 1000 annezad, p'emañ ar geidenn tro 42 er c'humunioù war an aod. Tro-kaer servijoù kêriekaat a weler o frouezh war an dachenn : tro 12 hektar a savadurioù nevez etre 2014 ha 2023, pa gonter an holl enkrogoù war al leur. Ha kresket e vefe evit-se

niver ar boblañs gant ar gwerzhañ tiez ? A-boan m'eo bet miret war-flod. Etre 2014 ha 2020 ez eus bet kollet 138 annezad gant Lokentaz, 8 % eus he foblañs. Un tamm spi a zeu diwar niveradeg an INSEE koulskoude : kontañ a reer 18 implij nevez...

Deomp war ur skeul all : hini an ensavadurioù publik a genlabour etre-kumunioù (EPGE pe EPCI), a vez lakaet war o chouk muioc'h-mui a varregezhioù terkañ an tiriad koulskoude Kumuniezh tolpad-kêrioù Gwengamp-Pempoull he deus bet artifizialaet 370 hektar dindan 10 vloaz, an tri c'hard anezho evit

« N'hon eus moaien lezennel ebet evit mirout ouzh an eil tiez. »

sevel lojezioù, e-keit ma kollont anezidi. Hevelep dislavar e Kumuniezh Lannuon-Treger, Kumuniezh Ploermael; Kumuniezh Lesneven Aod ar Mojennoù, Kumuniezh Kumunoù Bro ar C'hab - Beg ar Raz, hini Ledenez Kraozon-Arvor ar Stêr Aon, hini Kumuniezh Douarnenez pe hini Gorre Leon. Gwelet war ur skeul ledanoc'h, aet eo an artifiñsielaat douaroù da heul kresk ar boblañs muioc'h en douaroù eget en Arvor. Pa seller ouzh ar mare 2014-2020, evit pep hektar douar labour pe douar naturel bet kollet evit lakaat sevel tiez e konter 17 annezad nevez er c'humunioù Kreiz-Breizh pa ne vez nemet 12 e kumunioù an Arvor.

Un dek bennak a gumunioù o deus bet deroet aotreoù sevel ti evit eil-annezioù

ket ur redi. N'helle ket servijoù an ti-kêr chom hep gouzout ne vije ket bet degaset annezidi nevez gant ar savadurioù nevez-se. Ha pa vefe ar spi ganto e teufe lod eus an hañvourien d'en em staliañ eno da vare o leve. Daoust d'hor goulennoù, respont ebet roet da *Splann* ! Gant servijoù an ti-kêr. E Breizh a-bezh ez eo un dek bennak a gumunioù o deus bet deroet aotreoù sevel ti evit eil-annezioù. An holl anezho war an aod, an darn vras anezho er Mor-Bihan. Menegomp eta Bangor, Pennestin, Sant-Per-Kiberen, Lokmaria, Arzhon-Rewiz, Groe, Lokmaria-Kaer, Plouneour-Traezh-Brignogan ha Trelez, e-touez ar re o deus bet deroet 100 aotre d'an

AOTREOÙ SEVEL-TI DEROET EN ARVOR BET IMPLIJET EVIT EIL-ANNEZIOÙ

Penaos displegañ ur seurt c'hwitadenn neuze ? Da gentañ en ur sellet a-dostoc'h an aotreoù sevel ti bet deroet gant ar c'humunioù. E Sant-Kast-ar-Gwildoù ez eo 27 % outo a bled da vat gant lec'h ma vo eil-annezioù. E Lokentaz, ez eo un aotre sevel-ti war dri a zoug ur meneg eus pezh a vo ar savadur un eil annez. Ha c'hoazh, ar meneg-se n'eo



Un aotre sevel war un dachenn zo war vevenn 100 m e kêriadenn Porzh ar Vag, e Penn-ar-Bed, d'an 11 a viz Gouere.

nebeutañ dindan 10 vloaz.

Gant ur strategiezh evel-se e weler e chom goullto an tiez war an hir dermen, evel en ul lodenn vras eus inizi Breizh (Enizenac'h, Houad, Edig, Briad, Tudi, Molenez, Arzh, Baz), ha ne vevont nemet hanter-amzer abaoe bloavezhioù. E 41 kumun eus an Arvor n'ez eus annezidi nemet en un hanter eus al lojezioù war ar bloavezh, gant perc'henned o deus un annez ofisiel e lec'h all. Un evezhiadenn wiroc'h c'hoazh war aodoù ar Mor-Bihan : e Lokentaz, Arzhon ha Damgan, en tu all da dri-c'hard eus an annezioù zo eil-tiez.

Kerioù didud e-doug ar goañv, evel poltredet gant Benjamin Keltz en e levr Bretagne secondaire (Eil-annezet

Breizh). E 2020 e kaved an tri-c'hard eus eil-annezioù Breizh war gumunioù an aod. Tost da 200.000 lojeiz (RP2020, 198.706) a vez a-wechoù ar brasañ niver e kêrioù zo. Evel e Gwien evel m'eo annezet a-fragadoù hepken 72 % eus al lojezioù. Kontet e oa bet 600 eil-annez e 2009, pa oa 900 e 2020. Ha war an hevelep tro ez eus bet kollet hag annezidi hag implijoù gant ar gumun.

« *Ar gudenn eo n'hellomp ket nac'hañ ur goulenn aotre sevel ti m'eo reizh a-fed steuñv kêriekaat, ma ne fell ket deomp bezañ kaset dirak al lez-varn, eme Marie-Madeleine Michel, maerez Sant-Kast, keuz en he mouezh. Ha n'eus benveg lezennel ebet evit mirout ouzh ar sevel eil-annezioù.* » Etre hañv ha goañv e

weler ar boblañs o kreskiñ dre zek gwech, ha ret eo deomp postañ ar c’hant evit degemer anezho. « *Padal eo diazezet leve ar Stad war ur boblañs a 7.000 den* », a zispleg deomp c’hoazh.

Ha zoken m’eo deuet a-benn Sant-Kast da gaout ar wir da daosañ perc’henned eil-annezioù (30 % eus an taos annez-zañ ar bloaz-mañ, 45 % adalek 2025), dister e chom ar chañsoù da welet anezho dont da vezañ annezidi a-hed ar bloaz. Mall bras e oa ober un dra bennak, ha kavet gant an ti-kêr un disoc’h : kenderc’hel da greskiñ, en ur reiñ ar prioliezhañ d’al lojeizioù sokial war tachenoù ar gumun.

UN ANNEZAD EVIT PEP A ZAOÙ HEK- TAR A ZOUAROÙ

Tapet eo evel-se an takadoù kêriakaet-bras an aodoù. E Brest eo daougementet niver an eil-annezioù etre 2009 ha 2020, o tremen eus 1.510 da 3.052. E Sant-Brieg, eus 593 da 1.335. E Roazhon, eus 2.309 da 5.541. Pezh a gas da baouraat niver al lojeizioù da dapout, met ivez da gas ar boblañs pelloc’h war-zu an trowardroioù kêr, ha da aesaat an artifijsielaat. Met kevezerezh zo ivez etre ar bannlevioù tost hag al lojeizioù eil-annez : e Pleskob, tost diouzh Gwened, ez eus teir gwech muioc’h a eil-annezioù (eus 40 da 176) e-keit m’eo kresket eus 62% nemetken niver hollek al lojeizioù.

**En Arzon,
ar re gozh
zo pemp gwech
niverusoc’h
evit ar re
dindan 25 vloaz.**

Rouez a-walc’h kumunioù an Arvor o deus bet gwelet niver o eil-annezioù digreskiñ etre 2014 ha 2020 : Loperc’hed, Poullan Pleboull, Pont-Aven, Goulien ha Treglonoù e Penn-ar-Bed. Met ar c’humunioù a gaver un tamm pelloc’h en douaroù eo (anvet kumunioù diabarzh-vro) ma ya war zigresk an eil-annezioù.

Zoken m’eo aet war ziskar eus an hanter en dek vloaz diwezhañ niver ar goulenoù aotre sevel ti « lec’hel » (o chom en hevelep kumun), o tremen eus 40 % e 2013 da 20 % e 2020, darn vras an dud o c’houlenn an aotre a zo o chom e Breizh (en tu all da 80 %).

Tost an hanter eus kumunioù an Arvor (122) o deus bet kollet implijoù etre 2014 ha 2020. Lod outo (54) o deus ar blijadur da zegemer un nebeud annezidi ouzhpenn. Met petra a goust dezho ? E Ploueskad (Bro-Leon), 20 hektar a zouaroù

naturel pe labour-douar zo bet tapet evit lakaat sevel tiez. Da bep hektar eo bet degemeret a-boan daou diegezh nevez.


POBLAÑS AN AODOÙ O KOSHAAT, AR SKOLIOÙ O C’HOULLONDERIÑ

2020 eo erru kumunioù ar Arvor en ur c’horn-pleg a-fed demografiezh. Diwar vremañ e kaver muioc’h a gozhidi eget a yaouankizoù. Da geñver an niveradeg diwezhañ e oa bet kontet

SEU DOSTOC'H D'AR MOR SEUL VUIOC'H A DUD KOZH

Niver a dud ouzhpenn 65 vloaz hervez pegent tost int d'an aod e 2019, eus Il-ha-Gwilen betek al Liger-Atlantel

Niver a dud ouzhpenn 65 vloaz



Diwar: Insee - Filosofi 2019 (données carroyées 200m)

337.000 annezad en tu all da 65 bloaz¹. Ne oa bet kontet nemet 314.000 a dud yaouank dindan 25 bloaz. Ha n'eo ket un afer a genfeurelezh : war zigresk e ya niver ar yaouankizoù dindan 25 bloaz en Arvor, p'emañ o niver war-gresk e pep lec'h all eus Breizh. E 2020 en Arzhon e oa betek 5 gwech muic'h a dud kozh eget a dud yaouank dindan 25 bloaz.

Ledanoc'h an hed etrezo abaoe un dek vloaz bennak, ha war washaat e ya seul vui ma tostaer eus ar mor : el lojeizioù a gaver en takad dindan 200 metr diouzh an aod e kaver tro 20.000 a dud yaouank dindan 25 bloaz, met tost div wech niverusoc'h ar re en tu all

da 65 bloaz : 37.000 (diwar : Filosofi, roadennoù karrezennet da 200m, 2019).

M'eo tizhet kumunioù an Argoad kement ha kumunioù an Arvor gant digresk ar feur genel, dont a ra da vuanaat ar feur koshaat en Arvor. E Kiberen e veze degemeret 30 babig ar bloaz etre 2014 ha 2018. A-boan ma vez 20 war ar prantad 2019-2022... À Treogad, e 2022, n'eus ket bet ur gane-digezh zoken. Sin fall evit ar gumun he doa kollet ar bloavezh-se ivez unan eus an tri c'hlas a veze er skol. Digresk niver ar vugale er skolioù a ziskouez just a-walc'h e ya ur gumun war an diskar. Etre 2015 et 2023, e Breizh a-bezh

1] « Revenus, pauvreté et niveau de vie en 2019 - Données carroyées », dispositif fichier localisé social et fiscal (Filosofi), Insee, miz Here 2023

« Micherourien ar skoazell er gêr n'hellont ket kaout peadra da lojañ en Arvor dre m'eo erru re ger. »

eo digresket eus 8 % niver ar vugale er c'hentañ derez (publik ha prevez). Un digresk splannoc'h e kumunioù an Arvor (-9 %) eget re an Argoad (-7 %). Digresket eo niver ar vugale eus en tu all da 8 % e 143 diwar 250 kumun an Arvor.

E Ifiniég, lec'h m'eo kresket lodenn ar gêr eus 40 hektar, ez eus bet kollet tro 130 skoliad abaoe 2015 en div skol kentañ derez. E Treveneg, z-tal digresk niver ar vugale, eo bet serret ar skol brevez e 2019², daoust ma oa aet ar maer da c'houlenn skoazell digant renerezh eskopti ar gelennadurezh katolik. N'heller ket lâret n'en doa ket

klasket pep tra evit lakaat e gumun de greskiñ : deroet e oa bet 135 aotresevelti dindan 10 vloaz (ur sifr ne oa ket bet tizhet bis-koazh : 168 evit 1000 annezad) Souezhusañ disoc'h ar pres war an aod : n'hell ket tud kozh an eil-annezioù kontañ war frammoù lec'hel ar skoazell er gêr. « Degemeret e vezent c'hoazh 4 pe 5 bloaz zo,

met nac'het e vezont hiriv an deiz, a lavarer deomp en ADSCE, ur frammm skoazell er gêr diazezet e Dinarzh. N'eus ket a-walc'h a dud o labourat evit ober war-dro an annezidi a vez aze a-hed ar bloaz. Mankout a ra deomp 4 pe 5 den evit Sant-Kast, ha kement all e Frehel. Ouzhpenn-se an dud a vicher n'hellont ket kaout peadra da lojañ en Arvor dre m'eo erru re ger. Ha lod a zeu da zilezel o micher abalamour d'o frejoù hent, pa rannkont bezañ ouzhpenn un hanter- eur war an hentoù da zont da labourat. »

Evel-just n'eo ket kalz gwelloc'h e Kreiz-Breizh, evel en Uhelgoad, e Kallag pe er Gemene. War goshaat e

2] « Fermeture de l'école de Tréveneuc. Les explications de la direction diocésaine », Brice Dupont, Ouest-France, 1añ a viz Meurzh 2019

ya ar boblañs, mont a ra ar re yaouank kuit. Padal ez eo aesoc’h evit ur c’houblad yaouank dont en-dro d’en em staliañ.

« En Arvor ez eo diazezet un darn vras eus an ekonomiezh war ar servijoù d’an dud war o leve ha war servijoù ar yec’hed, hervez studi ar geografourien Aurélie Delage ha Max Rousseau. Padal, evit un den a c’hounez ar Smic, kaout dek kilometrad ouzhpenn d’ober div wech bemdez a lak en arvar pezh a chom e fin ar miz, dreist-holl pa weler prizioù an trelusk o kreskiñ kement. »

Retretidi en o aes war an aod, tiegezhioù dister o c’hoproù kaset da chom pelloc’h en Argoad... Kement-mañ hag a ziskouez un « doare divuheze-kaat hag ur riskl da goll ur c’hemmesk sokial, etre-rummadoù, met ivez oberezhioù a veze staliet en Arvor », hervez evezhiadennoù ar le C’HASER en e zanevell Produiñ ha bezañ o chom en Arvor³.

Ha muzuliet eo bet ar riskloù-se gant holl zilenñidi ar vro ? Pa lenner lod eus raktresoù an teulioù kêriekaat e c’heller soñjal e kendalc’h dilennidi zo da hunvreal en diorren kêr. E beg Ledenez Kraozon ez eus bet kollet ouzhpenn 800 annezad etre 2014 ha 2020. Met chom a ra dall an dilennidi. Hag er steuñv kêraozouriezh bet degemeret gant an etrekumuniezh e 2019 a gonte war un tech a-vat evit an demografiezh, tost eus keidenn ar rannvro



Ur skritell e ti-kêr Plomodiern o kemenn ar PLU i nevez.

(+0,5 %), pezh a zegasfe d'al Ledenez tro 5000 annezad ouzhpenn 2040. E 2023, pa oa bet kemmet ar steuñv kêraozouriezh o doa bet tro maered al Ledenez lakaat da vihanaat kementad an tachennoù nevez da artifiñsielaat. Ar c’hontrol eo o deus graet, hag adrummet en tu all da 30 hektar a zachennoù miret (takadoù 2AU) ha lakaat anezho e tachennoù da gêriekaat diouzhtu pe war verr dermen (U hag 1AU). Erbedet int bet gant an MRAE, Kefrediezh

3] *Produire et résider sur le littoral en Bretagne !*, Hervé Moulinier, Gilles Poupard, Kuzul-rannvro ekonomikel, sokial hag endroel Breizh, 9 a viz Mae 2017

Rannvro Aotrouniez an Endro⁴ ma « *adtafent o raktres kêriekaat en ur zigreskiñ niver an tachennoù betek ma vefe poellekoc'h o raktres, o keitañ gant tuadur an demografiezh* ». Degas a ra da soñj ouzhpenn « *diezhomm eo mont e kontrol eus emdroadur an demografiezh, lonket e vez re a zouaroù ha tachennoù labour-douar pa saver tiez nevez ha n'e vez degaset nemet eil-anneziou* ».

E Kankaven (35) kemm ar SLC'H (PLU) bet boulc'het e 2022 zo bet barnet kriz gant an MRAE⁵. Ha kadarnaat a ra he ali : « *Emañ ar c'henstrollegezh o terc'hel d'un dibab e-giz ma vefe ar boblañs o vont da ziorren, pezh zo kontrol d'ar pezh a weler er bloavezhioù diwezhañ* », ha resisaat a ra ouzhpenn-se « *darn vras al lojeizioù bet savet etre 2013 ha 2018 zo bet graet eil-anneziou diouto* ». Bet goulennet gant *Splann !*, n'he deus ket

respontet ar gumun d'hon goulennou. Ken souezhus ha ma seblant bezañ, en entan war ar gwerzhañ tachennoù ha savadurioù a seblant bezañ bet sparlet ar marc'had ha toullet an dizingalded, ha kaset an Arvor tamm-ha-tamm war-zu an diskar. Gant hon enklaskoù eo lakaet splann pegen enep-efedus e c'hell bezañ an artifi-sielaat an douaroù. Ha p'emañ al lezenn AER (artifi-sielaat ebet rik) en arvar e chom etre daouarn an dilennidi lec'hel ur sam-mad bras-tre a zouaroù naturel ha labour-douar prest da vezañ betonet. Hervez jedadennoù kaset en-dro gant *Splann !*, hollad an takadoù bet lakaet e rummad « da gêriekaat » er pemp kilometr kentañ war an Arvor az afe da en tu all da 10.000 hektar.

Jérémie Szpirglas ha Denis Vannier

4] « Avis délibéré de la mission régionale d'autorité environnementale de Bretagne sur le projet de modification n°1 du plan local d'urbanisme intercommunal valant programme local de l'habitat (PLUi-H) de la communauté de communes Presqu'île de Crozon-Aulne Maritime (29) », Bodad Rannvro Aotrouniezh an Endro (MRAE), 11 a viz Genver 2024

5] « Avis délibéré de la mission régionale d'autorité environnementale de Bretagne sur la modification n°6 du plan local d'urbanisme de Cancale (35) », Bodad Rannvro Aotrouniezh an Endro (MRAE), 17 a viz Du 2022

N'HELL KET LEZENN AN AODOÙ MIROUT OUZH EMLED AR BETOÑS

E 1986 e oa bet lakaet lezenn an aodoù da dalvezout, gant ar pal mestroniañ, digreskiñ zoken, gwask ar c'hêriekaat war an aodoù. Tost da zaou-ugent vloaz war-lerc'h e ranker anzav eo aet an taol er c'hleuz : digor marc'had ar sevel ti war an aodoù hag an tornaodoù. Ha dreist-holl war aodoù Breizh hag a oa bet gwarezet tamm-pe-damm koulskoude, betek ur pemzek vloaz bennak zo.



Vassili Feodoroff

- 】 Gant ar vaered e vez dalc'het alc'hwezioù ar c'hêriekaat, ha ganto emañ an ostilhoù da dremen e-biou d'al lezenn, evit kenderc'hel da ingalañ aotreoù sevel ti war an aodoù.
- 】 Diresis eo skrid lezenn an aodoù e lodenoù zo, ha digor ar plas evit reiñ displegadenoù tuet eus termenadurioù a-bouez, hag alese aesaat artifiñsielaat an douaroù.
- 】 Evit ma vefe aotreet savadurioù zo e vez an dilennidi o kemer harp war ar savadurioù nevez savet a-wechoù, ha pa vefent er-maez lezenn.

E 2015 e oa c'hoarvezet ur seurt kren-douar war ribl an Aber Benniget e Bro-Leon. N'eus ket bet kalz a dud o vezout dre ma ne oa ket kalz a cheñchamant war wel. Ha koulskoude ez eus bet roet gant kumun Plouvien 38 devezh-arat (19 ha) eus ribl an aber d'ur gumun all e-kichen, Treglonoù. 'Blam da betra ? Kuit da gumun Blouvien da rankout doujañ ouzh lezenn an aodoù hag a vire ouzh ar Sill, un embregezh vras poultr laezh, da sevel un tour disec'hañ.

Daoust ma z'eo bet roet e asant gant ar Stad, e c'heller en em c'houlenn hag-eñ n'eo ket un dro gamm e meur a geñver memes tra. Gwir eo n'eo ket gwall ledan ar vandennad dachenn bet profet, etre 20 hag 50 metrad anezhi.

Met ober a ra fae ouzh ar priñsip ne vez ket aotreet ar savadurioù nevez en ur vandennad 100 metrad ledander a-hed ar ribloù. Ouzhpenn-se ne vez ket gwarezet ken takadoù naturel tost eus ar ribloù, en tu all d'ar vandennad 100 metrad.

Evel ma c'hoarvez alies en aferioù kêriekaot e lakaer en a-raok abegoù ekonomikel. A-benn ar fin e oa bet divizet gant ar Sill dilojañ he raktres tour-disec'hañ ha savet eo bet e Landi. Evel Christian Calvez, maer dehou dis-seurt Plouvien d'ar c'houlz-se, zo ur bern maered c'hoant gante en em zizober eus lezenn an aodoù, dre ma vir outo da sevel ti evel m'o dije c'hoant.

Ha neuze e klaskont doareoù da vont e-biou dezhi, ha n'eo ket gwall ziaes e gwir. Pevar doare hon eus kavet hag a ziskouez pegen aes eo kenderc'hel da vetonaat didrubuilh war an aodoù.

FRAILH KENTAÑ : REIÑ GALLOUD AR C'HÈRIEKAAT D'AR MAER

Gant ar vaered emañ galloud ar c'hêriekaot, daoust m'en deus ar Stad da wiriekaot e vez doujet ouzh al lezennoù. Ar maer an hini eo a sin an aotreoù-sevel, ur wech m'eo bet studiet an doserioù gant ar servijoù ti-kêr. Dre ar SCOT (Brastres evit kenstagded an tiriad) bet

votet gant dilennidi ar c'horn-bro, hag ar PLU (Steuñv lec'hel kêriekaot) a deu diwarnañ, ez eo ar maer a ziviz ma c'heller sevel ti war dachenn-mañ-

tachenn.

Ur benveg kreñv a zo gantañ : ar fed e vefe troc'het ar gumun a dakadoù, lod ma c'heller sevel ti warno (o toujan ouzh un nebeud reolennoù tisavouriezh), lod all lec'h ma ne vez ket aotreet pep tra, hag ar re lec'h ma vez difennet groñs.

Kemeromp ur skouer, hini ar pezh a vez difennet d'ober gant lezenn an aodoù – en diavaez d'an takadoù kêriekaot dija – da lavaret eo, savadur nevez ebet en ur vandenn 100 metrad azalek live uhelañ ar mor pa vez reverzhi vras. Kement ha gwareziñ an aod evel-just, met ivez kement ha gwareziñ an dud e-keñver ar c'horventennoù ha live ar mor o sevel.

Peseurt mod betoñsañ hep kudennoù.

Evit mont e-biou d'an dra-se e weler a BLU da BLU, meur a zoare implijet. Kentañ hini : fiziañ war an doare takad lec'h m'emañ an dachenn. Da skouer, gant kumun Priel (22) ez eus bet lakaet e plas takadoù anvet NB evit « *al lec'hioù gouez dibar ha n'emaint ket e bandenn ar 100 metrad* ». Koulskoude, pa seller a-dost ouzh ar PLU, e weler c'hwec'h takad NB e bandenn ar 100 metrad.

Eil doare : doujañ ouzh ar seurt takad lec'h m'emañ an

dachenn met skañvaat ar reolennoù en destenn. Da skouer e vez lod eus kumunioù an aodoù oc'h aotreañ savadurioù zo en o fPLU, memes e-barzh bandenn ar 100 metrad. Kontrol eo da lezenn an aodoù met keit ma ne vez ket nullet ar PLU dirak ar justis, e kendalc'h da dalvezout.

E-touez ar savadurioù savet ar muiañ e bandenn ar 100 metrad emañ reoù an tachennoù kampiñ evel-just. Kalz a dakadoù « dudi » a gaver war an aodoù, hag alies e weler savadurioù, teltennoù, pe « mobil-home » o chom a-hed ar bloaz e diabarzh ar vandenn 100 metrad.

Tachenn gampiñ Bod-Konan e Fouen (29) a zo bet kondaonet e 2014 (hag ar gumun ivez war un dro) gant lez-varn

« Savadurioù bet savet hervez ar PLU met kontrol da lezenn an aodoù. »

velestradurel Roazhon¹ evit bezañ bet staliet teltennoù bras er vandenn 100 metrad. Ur varnadenn kadarnaet gant lez-varn-galv Naoned².

Hag evel-just e saver pe e ledanaer hentoù da gas d'an tachennoù kampiñ pe d'ar savadurioù-se, pe vijent hervez lezenn pe ne vijent ket. E Fouen adarre, eo bet aotreet digeriñ un hent 'benn gellout sevel daou savadur kostez Kerlosken, en desped d'ar fed eo difennet d'ober kement-se e bandenn ar 100 metrad. Nullet eo bet an aotrese gant al lez-varn a-benn ar fin³, ha kondaonet eo bet ar gumun⁴.

Pa lenner al lezenn, ne c'heller ket kemer e kont un dachenn gampiñ evel ma vije ur gêriadenn pe un takad kêriekaet hag a vez dalc'het kont eus

1]Diviz n°1100343-1 lez-varn velestradurel Roazhon, 13 a viz Genver 2014

2]Diviz n°14NT00667 lez-varn velestradurel Naoned, 10 a viz Ebrel 2015

3]Diviz n°448517 kuzul-Stad, 23 a viz Gwengolo 2021

4] Diviz n°449546 kuzul-Stad, 23 a viz Gwengolo 2021



Vassili Fedotoff

Posubl eo sevel kampingoù war bandenn 100 metrad tost eus an aod. Met ret eo e vijent aes da lemel kuit. Amañ e traezenn Pors ar vag e Plouidiern (29).

outo evit muzuliañ « live kêriekaat » ur gumun.

Koulskoude pa seller ouzh ar skeudenoù karr-nij (evel ma ra ar varnerien alies, kuit dezho da vont war al lec'h) e c'hell bezañ damheñvel. Fellout a ra da gumun Treveneg⁵ (22), da skouer, la-kaat un dachenn gampiñ en takad « U » (takad kêriekaat) daoust m'emañ tost-tre ouzh an aod. Klasket hon eus gouzout hiroc'h gant ar gumun met n'hon eus resevet respont ebet diganti.

EIL FRAILH : UN DESTENN DISPIS A C'HELLER TREUZVEIZAN

Afer bandenn ar 100 metrad a zo aes a-walc'h da gompren. Met luzietoc'h

ha teknikel a-walc'h eo peurrest lezenn an aodoù. Ar priñsip pennañ a gaver er mellad L.121-8 eus kod ar c'hêriekaat : forzh peseurt astenn d'ar c'hêriekaat, pe savadur nevez, ne c'hell bezañ graet nemet tal-kichen takadoù kêriekaat dija. Pezh 'zo, ne vez ket resisaet gwech ebet petra eo « *un astenn* », pe un « *takad kêriekaat* », pe ar fed bezañ « *tal-kichen* ».

Meneget e vez el lezenn « *bourkoù* » ha dreist-holl « *kêriadenoù* », o lavaret e rank bezañ stank ar savadurioù, o reiñ un niver a diez, spas etrezo, met hep resisaat peseurt spas. Kaoz a zo ivez eus hentoù ha deus rouedadoù o kas d'an dachenn lec'h ma raktreser sevel ti, ha deus stalioù, skolioù pe ilizoù a

5] Steuñv lec'hel ar c'hêraozañ (SLK) e Treveneuc Ouest, reolennoù grafek, rannadur ha reolennoù, 29 a viz C'hwevrer 2024

« Ar vaered o varc'hata kêriadennoù kenetrezo »

c'hellfe bezañ tro-dro. Dre ma n'eo ket resis tamm ebet e c'hell an dilennidi kompren ar pezh a fell dezho, daoust ma vez roet o ali gant servijoù ar prefed ha gant ar varnerien pa vez dizemglev.

Ar pezh a gont eo ar varnadurezh. Da skouer, da geñver un afer e kumun Plunered (56), en deus kinniget ar C'huzul Stad e vije un daou-ugent bennak a diez⁶ evit ma c'hellfer komz eus ur gêriadenn,

met hep resisaat pegen stank e ranke bezañ an tiez-se. Dibaoc'h e weler ur bern kêriadennoù a vezer aotreet da astenn ha da sevel ti enno hervez PLU kumunioù an arvor, adal ar poent ma zo ouzhpenn daou-ugent ti oc'h ober anezho.

E 2018 e oa bet divizet dre al lezenn ELAN (savet evit pezh a sell eus al lojeiz, an terkañ hag an niverel)⁷ e vefe divizet gant dilennidi an tiriad, da-geñver danzen ar SCOT, petra eo « ur gêriadenn » dre just. Neuze e c'heller gwelout lod anezho o varc'hata kenetrezo, pephini o klask lakaat un nebeud tiez da zont da vezañ « kêriadenn ». Setu pezh a lavar Anicette Jacopin, prezidantez « *ar gevredigezh evit doujañ ouzh lezenn an aodoù e Bro an Alre* » (ALLPA).

Evit diskouez ez eo gwir gêriadennoù, e laka lod eus ar vaered panelloù skrivet « *Village* » warno dirak an anvioù-lec'h. Setu pezh en deus graet

maer Plonevez-Porzhe e Kervel, Tresmalaouen ha Santez Anna ar Palud (dibaoc'h eo bet nullet PLU ar gumun gant ar varnerien).

Soñjal a ra d'ar wirourien ispisializet war an danvez-se, ez eo diaes-kenañ divizout petra eo ur « gêriadenn », e-keñver ur « pennkêr » pe tiez strewek. Subjektivel da vat eo, pezh a laka an testennoù kêriekaat da vezañ bresk a-fed lezenn. Dre m'hon eus studiet a-dost PLUoù kumunioù an Arvor e c'hellomp embann ez eo bresk a-fed lezenn 40 % anezho, a-wechoù e meur a geñver.

Koulskoude ez eo diazezet lezenn an aodoù war ar ger « kêriadenn », dre ma c'heller sevel savadurioù er « c'hêriadennoù » evit ma vefe stankoc'h an tiez enno, met ivez evit astenn anezho. Pezh a laka an douaroù da vezañ krignet tamm-ha-tamm, a vloaz da vloaz, a bPLU da bPLU.

En tri fennkêr lakaet da « gêriadennoù »

6] « Référentiel loi littoral », levrennig 1, p63, prefeti rannvro Breizh, miz Genver 2024

7] « Loi portant évolution du logement de l'aménagement et du numérique (Elan) », pajenn internet ar ministrerezh an treuzkemm ekologel, bet gwellet e miz Even 2025

« Gant ur “gêriadenn” e c’heller stankaat an tiez enno, hag astenn anezho. »

e Plonevez-Porzhe e vefe bet posupl sevel tiez a bep tu d’ar re a zo dija, betek ma vefe stok-ha-stok ar « c’hêriadennoù » ha kêriekaet a-hed an aod. Ne vije chomet park ebet ken, « troc’h kêriekaet » ebet etre ar pennkêrioù neuze.

Ur mod all da vont e-biou d’al lezenn eo ar mod da dresañ bevenn an takadoù « tost d’an aod », lec’h ma vije ret sevel nebeutoc’h a savadurioù eget e peurrest ar gumun. Dispis-kenañ eo testenn al lezenn adarre. An takad « tost d’an aod » a vez bevennet diwar meur a fed : an hed e-keñver ribl ar mor, ar fed vije kêriekaet al lec’h pe get, hag ivez ar fed vije gwelet ar mor pe gwelet an tiez eus ar mor.

Gant an dilennidi e vez dizivet pelec’h e tremen ar vevenn-se. ‘Blam da se e vez gwall gammdroek bevennoù ’zo, oc’h ober tro park-mañ-park, hag o leuskel a-gostez tachennoù all, o tostaat da vat ouzh bandenn ar 100 metrad a-wechoù ha deus ar ribl e-unan zoken. Anat eo emañ an tid o ren pa weler an troc’hoù d’ar vevenn etre div gumun nes.

TREDE FRAILH : UL LEZENN GRAET EVIT MIROUT DA STREWIÑ RE A DIEZ

« *En gwirionez, daoust d’ar pezh a c’heller soñjal, e vir ar mellad L.121-8 ouzh ar fed vije tiez strewet a bep tu, muioc’h c’hoazh eget na vir ouzh ar betoñs d’en em ledañ war zouaroù an arvor* » eme Laurent Le Clech⁸, gwiraour ar c’hêriekaet ha lezenn an aodoù.

Pa vez aotreet astenn ar c’hêriekaet, e rank bezañ graet stok ouzh an tachennoù savet tiez warno dija. Ha pa fell d’un ti-kêr stankaat ar c’hêriekaet, ne c’hell ket bezañ graet en diavaez eus an takadoù kêriekaet dija. Padal en ur ober er mod-se, eo evel dibluskañ ur penn ognon ’benn ar fin, plusk a blusk, ha neuze e vez krignet an takadoù naturel tamm-ha-tamm. Ur wech graet tro un takad penn-da-benn, e tegouezh hennezh e-barzh an tachennoù

8] Cheñchet eo bet an anv evit ma vo dizanv an den

Treveneg :

Un troc'h kêriekaat o vont d'a get ?



Mammennoù : Steuñv lec'hel kêriekaat Treveneg (2007, 2020, 2024)

Etre daou lec'h kêriekaet vez kavet troc'hoù, a gaoz d'ar skoilhoù naturel, evel e Treveneg (Aodoù-an-Arvor), gant traoñienn Kerpont.

Ar stêr a zisparti ar gêriadenn diouzh ar gêriadenn Les Dalliots. War ar gartenn gentañ e weler war un tu un takad kêrel pennañ (e ruz) hag war an tu all ur gêriadenn (e orañjez). Bevennet eo e astenn gant lezenn an aodoù. Er PLU a oa e talvoud betek 2019 e oa bet renket an draonienn-se evel un takad naturel, skarzhet diouzh an tachennoù sevel. Un troc'h kêriekaat naturel e oa.

Ar steuñv kêriekaat bet decidet e miz C'hwevrer 2020 en deus lakaet an draonienn-mañ da vezañ un tamm nebeutoc'h naturel. Bremañ e teu war wel evel un Takad Kêrel gant ur vicher dudi gweledvaet (e melen). Ur park eeun, gant e gwenodenn vale. Ha goude : liammet e vo ar sektoroù kêriekaet a bep tu d'ar saonenn ?

War an eil kartenn n'eus ket kin an troc'h kêriekaat e raktres PLUi ar gumuniezh tolpad-kêrioù Sant-Brieg Arvor, a zo e-barzh Treveneg. Ne vefe ket mui Les Dalliots ur gêriadenn distag diouzh ar gêr met stagañ a raent ouzh takad kêrel ha tachennoù Treveneg a vo kêriekaet (e ruz).

aotreet da vezañ savet tiez warno. Tost atav ez eo er mod-se e ra ar c'humunioù da gaout douaroù nevez da gêriekaat en o fPLU.

Sellomp da skouer ouzh ar pezh a c'hoarvez en ur gêriadenn bet savet gant pesketourien gwechall, stok ouzh traezhenn Betahone Ambon e Bro-Wened (56). Daoust m'emañ e-kreiz un takad « Natura 2000 »⁹, e fell d'ar gumun kreskiñ ar c'hêriekaat tro-dro¹⁰. War ribl an draezhenn, e kornôg ar gêriadenn, e oa un dachenn gampiñ dibaoe ar bloavezhioù 60, bet serret goude-se. Etre kreiz ar gêriadenn hag ar c'hamping zo un nebeut devezhioù-arat gouez : ur palud ha n'eo ket meneget war ar PLU, daoust dezhañ bezañ war dielloù ar SAGE (Steuñv terkañ ha merañ an dour).

El lec'h-se, hervez ar pezh a c'heller gwelout war ar PLU bet votet e 2020, e c'hellje ar gumun aotreañ ar sevel ti en amzer da zont, daoust ma z'eo un takad gwerc'h. Arguzenniñ a ra an dilennidi e-karg war ar fed e fell d'ar gumun sikour un den a zo en em ginniget nevez zo da adlañsañ an dachenn gampiñ. Padal n'eo ket ar raktres derc'hel un dachenn gampiñ, met kentoc'h ober deus outi ur park touristel ha dudi, 95 ti ha tiig koad ennañ, etre 44 m² ha

Krignet e vez an takadoù naturel, tamm-ha-tamm.

82 m² a gorread anezho, e-touez savadurioù all. Ur mod kêriekaat eo ur park a seurt-se, pezh n'eo ket un dachenn gampiñ.

Entanet eo an dilennidi e-karg gant ar raktres-mañ dre ma lakao an ekonomiezh da vont war-raok hervezo. Gantañ e vije lonket ar palud hag a zeu da vezañ kêriekadus en un taol. N'eus ket fellet d'ar maer respont d'hor goulennoù.

En doser-mañ eo deuet a-benn ar c'hevredigezhioù a zifenn an endro da lakaat gwask a-walc'h ha da c'hounit, o c'houzout memes tra eo aet a-duganto, a-enep ar raktres, an DDTM (Renerezh departamant an tiriadoù hag ar mor). An embregerezhioù terkañ, IFI ha Viabilis, o doa savet ar raktres kêriekaat-se o deus dilezet an doser d'an 9 a viz Here 2024. An deiz

9] « Cartographie des espaces naturels et protégés », lec'hienn Ensavadur broadel ar glad naturel, pajenn internet bet gwelet e miz Even 2025

10] « Ambon. Avec 135 logements prévus, le maire annonce une année 2022 en béton ! », Ouest-France, 3 a viz Genver 2022



Daniel Goyat, maer ar Forest-Fouesnant, en e burev, a ziskouez PLU ar gêr, d'an 11 a viz Kerzu 2022.

war-lerc'h he deus divizet ar gumun tennañ an aotre terkañ evit an takad-se, gant ma n'ez afe ket pelloc'h ar c'hevredigezhioù dirak ar justis¹¹.

Pezh a dalv, memes en ur chom hep strewiñ an tiez, e vije posupl sevel ti war un tiriad en e bezh, tamm-ha-tamm, tachenn-ha-tachenn, hep bezañ kontrol da lezenn an aodoù. Setu ar pezh a zo c'hoarvezet e kumunioù Plougerne (29), Loktudi (29) ha Penmarc'h (29).

Goude dek-vloaziadoù a bolitikerezh betoniñ stank-ha-stank, ha didrouz

koulskoude, eo deuet o fPLU da gadarnaat ar c'hêriekaot-se war-lerc'h, hep na vijent re maez lezenn 'benn ar fin.

PEVARE FRAILH : ARABAT MENEGIÑ AR C'HOULZ SEVEL TI

Aze 'mañ si bras diwezhañ lezenn an aodoù : ne ro aotre da gêriekaot nemet tal-kichen tachennoù tiez warno dija, met tiez savet peur ? « *Divizout a ra ar barner hervez stad al lec'h devezh ar varnedigezh, eme Laurent Le Clech, keuz gantañ diwar-se. Neuze e c'heller*

11] Arrêté concernant le retrait du permis d'aménager n°PA 056 002 23 Y0001, ti-kêr Ambon, 10 a viz Here 2024



A-us traezhenn Kervel, tiez nevez en ur gêriadenn. An ti-kêr a fell dezhañ sevel tiez eno.

ouzhpennañ un nebeut tiez ha, goude ur pennad, unan all c'hoazh, hag all hag all... Ar barner ne oar ket peur eo bet savet ti-mañ-ti, ha neuze ne gav netra da rebech. Setu penaos en em led ur gêriadenn, betek dont da vezañ ur gêr. »

A-bouez eo kement-se, rak ma zo bet savet tiez maez-lezenn da skouer, e rankfe ar barner derc'hel kont eus se evit barnañ an afer a deu da-heul, sañset. Hiriv avat ne vez ket graet.

« Ma toujer ouzh spered lezenn an aodoù e c'heller soñjal e vefe mat barnañ an traoù hervez ur stad-lec'h resis, lakaet da dalvezout e 1986 pa z'eo kroget al lezenn da dalvezout. »

Memes evit un ti e-unan, e vefe mat kaout stad ar savadur d'ur c'houlz resis. Ma fell d'ur perc'henn kreskiñ e

savadur da skouer, e vez aotreet d'en ober gant ma touj ouzh un dregantad a gorread e-keñver an ti orin. Dezhañ da venegiñ : « *da goulz votadeg ar PLU* ». Dre ma bad ur PLU un dek pe ur pemzek vloaz bennak, e vije kazi posupl kreskiñ un ti ken alies-se pe dost. Trawalc'h eo gortoz ur PLU nevez evit astenn adarre.

O tielfennañ ar mod ma vez kemmet ar PLUoù tamm-ha-tamm, e c'heller kompren petra eo ar youl kêriekaat a vez tro-kein war hir dermen. Evel-just ne vez ket strewet tiez forzh pelec'h, hag e vez doujet ouzh ar fed sevel savadurioù da-heul an takadoù kêriekaet dija, met a bPLU da bBLU e y'a war-gresk ar c'hêriekaat memes tra.

Pa rank ur gumun kemm he fPLU, e

c'hoarvez e vije lavaret da berc'henned zo hastañ da gregiñ gant o chanter, ma n'eo ket graet, diwar un aotre bet roet dezho. Setu ar pezh en doa graet maer Pornaleg-Leskon (29) e 2014, o kas ul lizher ofisiel d'ur perc'henn evit kelaouiñ anezhañ¹² e c'hellfe e dachenn cheñch rumm, ha koll e aotre sevel-ti, e liamm gant lezenn an aodoù.

D'an deiz ma oa bet kaset dezhañ al lizher ne oa ti ebet war dachenn ar perc'henn, evel war an div dachenn nesañ. E miz Mae 2016, e oa bet savet ti war an div dachenn nes ha kroget gant ar chanter war e hini. An deiz a hiriv eo echu e di, neuz mod nevez gantañ, pezh a ra un tamm iskis er gêriadenn. Al lizher kelaouiñ kaset gant an ti-kêr a seblant bezañ ur mod da ledanaat ar c'hêriekaot er pennkêr bihan-se, un ugent ti bennak ennañ, kentoc'h eget skoazell ez personel perc'henn an ti-se. Meur a dra a-dreuz e-keñver lezenn a zo c'hoarvezet er c'hornad-se eus kumun Pornaleg-Leskon, erru kozh-tre he fPLU (bet degemeret e 2006 ha nevesaet e 2019). Aet eo an aotrou maer Alain Lucas d'an anaon e 2022, ha n'eus ket fellet d'ar maer nevez na d'e guzul-kêr respont d'hor goulennoù resisadurioù. Pezh a ranker lavaret memes tra eo

Posupl e vije sevel ti war un tiriad en e bezh, tachenn-ha-tachenn.

ar fed e vefe eus ur seurt « reolenn » gant ar c'hêriekaot : pezh a dremen a dremen, ha ne deuer ket war-gil morse pe dost, zoken dirak ar justis. Rak ma c'hoarvez d'un aotre sevel ti bezañ nullet, pe ma vez disklêriet un ti maez-lezenn, ne vez ket distrujet ar savadur evit kement-se. N'eus nemet ur skouer gontrol avat : un ti koad bet savet war ribl ar mor e Sant-Eflamm war gumun Plistin (22). Un ti savet maez-lezenn hag a zo bet distrujet (diwar ur varnadenn eus 2020), goude un hir a emgann dirak al lezioù-barn, hep ma vije bet peurgempennet an dachenn evel dleet koulskoude. En tu all d'ar skouer-se avat, e c'heller kenderc'hel da gêriekaot peurliesañ, memes da-heul savadurioù maez-lezenn.

Jérémie Szpirglas ha Denis Vannier

12] « Constructibilité parcelle », Lizher ti-kêr Plobannalec-Lesconil, d'ar 24 a viz Even 2013

Penaos e vez dispennet lezenn an aod gant ar Stad

E miz Genver 1986 e oa bet embannet al « *lezenn diwar-benn an terkañ, gwareziñ ha talvoudekaat an aodoù* » da heul ar « *sturiad d'Ornano* » e 1979, a lakaet e plas ar reolennadur dre vras – diwar-benn an difenn sevel tiez war an takad 100 metrad diouzh ar mor paneveken. Lakaet e oa bet da dalvezout war an holl gumunioù war an aodoù, met ivez ar re war vord lennoù dour ledan ha stêrioù betek harzoù an dour sal el lanv. Peder lodenn a oa enni, an holl pe dost o plediñ gant ar c'hêriekaet : broudañ an neveziñ (an enklaskoù), kadarnaat padusted ekonomiezh an doureier (peskerezh, treuzdougen war vor, ha kement zo) met ivez an ekonomiezh ne denn ket eus ar mor, (labour-douar, industriezh, touristelezh, ha kement 'zo), evit gwareziñ ha talvoudekaat an endro, ha da gentañ penn takadoù heverk an aodoù.

Gant pep lezenn kêriekaet e vez roet un taol kempenn da lezenn an aodoù. Gant al lezenn Elan e vez roet dezhi un taol kontell ouzhpenn. Estreget rediañ an dilennidi da verkañ o-unan ar c'hêrioù hag an tolpadou e lak da dalvezout ivez ur meizad nevez, hini an « *Takad Kêriekaet Dija* » (TKD/SDU), er-maez eus an tachennoù tost d'ar mor.

STANKAAT AR C'HÊRIEKAAT EN UR STOUFAÑ AN « DENT KLEUZ »

Nevezenti er c'hemplezhegezh melestradurel a bled gant ar c'hêriekaet, an TKD/SDU n'eo ket tamm ebet an « *takadoù kêriekaet dija* » a oa meneget e Lezenn an Aodoù. Degaset e oa bet an diferadur-se el lezenn dre ur c'hemm bet douget gant Mickaël Nogal, mouezh aotreet strollad ar Republikaned war-raok, hag Hervé Pellois, kannad (LRM) ar Mor-bihan da neuze.

Gant an TKD, al lezenn Elan a ro tro da stoufañ an « *dent kleuz* » ha da stankaat ar c'hêriekaet. « *Gwechall e veze ar varnerien o sellet ouzh ar c'hêriadennoù evel ma vefent ur gêr ma vefe enno un daou-ugent ti bennak d'an nebeutañ, padal ez eo izelaet ar feur da ugent ti bennak gant an TDK, eme Vincent Esnault, prezidant at Gevredigezh evit Saveteiñ Bro-Fouenant, keuz en e vouezh. Pal e lezenn Elan, sañset, a oa da zistankañ al lezioù-barn : er c'hontrol mik e vimp lakaet da varn en-dro aferioù a soñje deomp e oant klaset. »*

*Emañ Vincent
Esnault, stourmer
ha dilennad Ar
re wer e ti-kêr
Fouenant (29),
o tiskouez ur
savadur maez-
lezenn e trezenn
Beg Meil.*



« Da c'hortoz e oa, hervez dielfennadur Valérie Vasseur¹, bet e melestradurezh an DDTM e rannvro Breizh. Moaien e vefe bet da dennañ gounit eus al lezenn Elan evit sklaeraat an doare da gompren ar skrid ha da gaout ur sell hollek war al lezenn, evit kadarnaat surentez lezennel an teulioù kêriekaat. Dileuridi an DDTM zo bet pedet da zont da Bariz just a-walc'h evit labourat war-se, pezh a zegase spi

1] Cheñchet eo bet an anv evit ma vo dizanv an den

e-leizh evit an dilennidi koulz hag evit ar c'hevredigezhioù. Padal, pa 'z omp erruet eno e oa bet kadarnaet an holl ziferadoù dija. N'eus ket bet taolet kont eus pezh hon oa bet klevet ha bevet war an dachenn. Ha neuze : ur skrid skrivet fall, a chom diresis da implijout. Louzet en em sant an dilennidi, ha seul vui ma ne dalvez ket pennaenn ar stoufañ an dent kleuz en TKD war an takadoù tost ouzh an aod. »

« Dre al lezenn ez eo strizh-tre ar c'hondisionoù evit resisaat un TKD/SDU, eme c'hoazh Laurent Le Clech², gwiraour hag arbennigour war Lezenn an Aodoù. E-kichen da-se, ober eus ur gêriadenn ur « gêr » a zo mil gwech simploc'h. Evel-se e weler ur c'hiz nevez o tont er PLUoù : distro krak-ha-berr ar 'Gêr ', abalamour m'eo kalz gwevnoc'h da resisaat el lezenn, ha tre betek an takadoù tost eus an aod ! »

Jérémie Szpirglas ha Denis Vannier

2] Cheñchet eo bet an anv evit ma vo dizanv an den

TRO-KEIN UR C'HÊRIEKAAAT HA N'EO KET MESTRONIET KEN

E-tal ar betoniñ o plantañ tizh en Arvor e c'heller kavout harzelloù, rakwelet e oant bet gant al lezenn zoken. Da skouer, an teulioù hag aktoù kêriekaat a rank tremen ur c'hontroll lezennegezh kemeret e karg gant servijoù ar Stad. Seul daol e ya an dilennidi da gavout repu dindan disglavier ar prefetioù, pezh a ro dezho pep reizhded, hervezo. E lec'h all emañ ar wirionez, pa n'eus ket a-walc'h a dud ha diouer a bolontez politikel.



Vassili Feodoroff

- 】 Gwechoù zo e vez servijoù ar prefetioù o reizhekat savadurioù er-maez lezenn, evel m'eo bet diskouezet splann gant skouer Visant Bollre hag enez al Loc'h ken arouezius.
- 】 N'eus ket a-walc'h a dud hag a arc'hant gant servijoù ar prefeti evit ma c'hellfent kontrolliñ lezennegezh ar steuñvoù kêriekaat lec'hel, an aotreoù sevel ti hag aktoù all.
- 】 Gant ar brefeded emañ ar galloud divizouat, hep ma vefe heuliet ganto bepred ali ar servijoù bet lakaet da studiañ an teuliadoù.

Lakaet e oa bet an afer a-wel d'an holl e 2012 a-drugarez d'ar gevredigezh Breizh Vev, merourez mirva naturel enez Sant Nikolaz er Su d'an inizi Glenan (29). Soñj en deus Romain Ecorchard, gwiraour ar gevredigezh Breizh Vev da vare an darvoud : « *Implijidi ar gevredigezh o doa merzhet e oa bet lakaet skloturioù tro-dro da Enez al Loc'h, er Su d'ar Glenan, hag e oa bet savet un ti-gwer-tunel ivez, ha kempennet a-galz ar savadurioù a veze eno, en o zouez an ti-feurm chomet dilezet betek-henn.* » Kempennadurioù er-maez lezenn penna-benn hervez lez-varn Kemper¹, e-keñver Lezenn an Aodoù da gentañ, met ivez abalamour m'eo rummataet al lec'h, an uhelañ gwarez ma c'hell kaout.

Kalz a drouz tro-dro d'an afer, dreist-holl abalamour d'an hini a oa bet lakaet e kaoz, ur penn-bras anavezet gant an holl : an SA Bolloré, da lâret eo Vincent Bolloré, paotr an aferioù, miliardar ha perc'henn meur a vedia. Gant al lez-varn e vez kinniget an SA Bolloré² evel perc'henn an enezenn. Dre ma felle da baotr an industrioù brasaat gorread e annez ha kaout peoc'h da vat war an enez, en doa lakaet ober un toullad

labourioù, met hep kemer ar boan da sevel un diskleriadur diagent pe ur goulenn aotre sevel a vefe bet nac'het forzh penaos.

N'emañ ket a-du gant an dra-se an SA Bolloré³ o lâr ne oa ket dañjerus evit ar vevliesseurtes al labourioù o deus graet. Hervezi, pep tra zo bet graet hervez al lezenn.

A-benn ar fin eo ar gevredigezh Breizh Vev he deus skoet an taol. « *An dud e kont o deus goulennet meur a wech kaout emgav ganeomp, o klask kendrec'hiñ ac'hanomp da dennañ hor c'hlemm a-raok ma yafemp betek ar breudoù, evel ma lâr deomp Romain Ecorchard.*

Padal, e-keit ma oa ar justis o vont gant he hent eo bet reizhekaet ul lodenn eus al labourioù kempenn gant prefeti Penn-ar-Bed. Pezh n'en deus ket miret al lez-varn da gondaoniñ

an embregerezh Bolloré da baeañ ur sammad dister a-walc'h d'ar gevredigezh. »

7.000 € a zic'haou, ouzhpenn ar frejoù lez-varn hag hucher⁴, evit ur sammad a 2.238 €. Mantret eo memes tra Romain Ecorchard gant emzalc'h ar brefeded an eil war-lerc'h egile : « *A-benn ar fin n'o deus graet diaester ebet evit reiñ an aotreoù, ha pa oa evit reizhekaat labourioù a oa er-maez lezenn koulskoude.*

Lañset he deus an SA Bolloré labourioù war Enez Loc'h hep aotre ebet.

1] Jujamant n°11-15-000853, lez-varn Kemper, d'an 30 a viz Here 2015

2] Lizher skrivet gant Vincent Bolloré ha kaset da Bretagne Vivante, 13 a viz Du 2012

3] Échanges de courriers entre la SA Bolloré et la direction départementale des territoires et de la mer du Finistère, mai 2017 et janvier 2018

4] « Bolloré condamné pour travaux au Loch », Philippe Guégan, Ouest-France, 31 octobre 2015

Diouzh un tu all, sañset e vefe bet ar prefeti bezañ diouzh hon tu evit reiñ dorn deomp evit ar rekourioù el lez-varn. N'o deus graet tra ebet... »

N'he deus ket prefeti Breizh respontet d'hon c'houlennoù.

A-WECHOÙ NE RA VAN AR PREFED GANT SERVIJOÙ AR STAD

An istor-se a « dreuztremen ordinal », kaset gant Vincent Bolloré war Enez al Loc'h zo arouezius eus an doare ma c'heller tremen bemdez e-biou da Lezenn an Aodoù. Meur a di a vez savet hep

kaout an aotreoù ret er Frañs, kuit d'o ferc'henn da gaout ur respont nac'h pa vez goulennet an aotre.

Diaes-mat eo gellet reiñ an niver resis anezho dre m'az int er-maez lezenn, met niver an torraturioù lezenn graet ouzh gwir ar c'hêriekaet hag ar sevel ti bet enrollet gant servijoù ar polis ha gant an archerien a oa eus 4.100 ar bloaz etre 2012 ha 2021.

Tud all c'hoazh a ya da heul hentenn ofisiel ar velestradurezh, gant ar spi e c'hellint lakaat o zeuliad da dremen dre fazi. Pe gant ar spi e vo re a labour gant ar servijoù e kaoz (en tiez-kêr pe er prefetioù) evit ma vefe ensellet

« Evit kaout ar peoc'h, e vez ar maer oc'h reizhekaat war-lerc'h ur savadur bet graet hep tamm aotre. »

o aotreoù e koulz, da lâret eo e vefe aotreet goude ma chomfe daou viz hep tamm respont. Hervez Laurent Le Clech⁵, gwiraour hag arbennigour war gwir kêriekaet an aodoù, « *alies-kaer, evit kaout ar peoc'h, e vez ar maer oc'h asantiñ, peotramant e reizhekaat war-lerc'h ur savadur bet graet hep tamm aotre — ha pa rank a-wechoù kemm ar steuñv lec'hel kêraozañ(SLK/PLU)* ».

E hanternoz kumun Treveneg, dindan 150 metrad diouzh ar mor, setu ma oa erruet e penn-kentañ 2017 un astenn war un ti, padal ne oa bet kavet roud ebet outañ e diaz broadel an aotreoù sevel ti abaoe 2014. Ha n'eo ket hep

5] Cheñchet eo bet an añv evit gwareziñ dizanv an den



Vassil Fectouloff

Ti-kêr Fouenant

abeg : en SLK, a oa bet savet e 2007, e oa bet rummataet an tachennoù e kaoz e rumm Na (tachenn naturel), p'eo hewel diouzh ar mor, ha n'eus savadur evet war an tachennoù all tro-dro (pezh a rafe da neuze un torr-kêriekaat) : n'eo ket posupl e vefe bet deroet un aotre evel-se. Ha koulskoude, en SLK/PLU nevez, e 2020, e oa erru « UB » an takadoù a-greiz-holl, da lâret eo e oant kêriekaet evit bezañ annezioù dreist-holl, pa ne oa c'hoazh tamm savadur ebet war an takadoù tro-dro. N'hon eus bet respont ebet gant ti-kêr

« Lakaet en deus an tachenn e statud “da sevel” evit reizhañ an aotre. »

Treveneg ouzh hor goulennoù.

« E 2019 hon eus rañkontret an Aotrou Sérandour, maer ar gumun, evit diskouez dezhañ, gant teulioù-skoazell, kudennoù ha dislavararioù a zo er raktres PLU a vo votet e 2020 », a soñj un annezad eus ar vro hag a

fell dezhañ chom dizanv. N'oe ket bet gouest *Splann* ! da brouiñ an dras-se, rak n'eus ket respontet d'hon goulennoù an ti-kêr.

« *Goulennet en deus diganeomp chom hep bezañ nec'het gant an tachennoù-se rak e vo lakaet e statud « tachenn sevel » evit reizhañ an aotre. Ha just-awalc'h,*

n'eo nemet e-kerzh ar mi-zioù diwezhañ, meur a vloaz goude e sevel, e oa bet kens-taget an ti-se ouzh ar rouedad dour-lous. E-kerzh an atersadenn-mañ, en doa lâret deomp en doa vetoet an takadiñ naturel kinniget gant ar burev studi evit douaroù e Port Goret, a oa un troc'h kêriekaat koulskoude. Da-heul an atersadenn-mañ e oa fuloret, en deus kaset ac'hanomp kuit hag en deus

ket c'hoant kin gwelet ac'hanomp en ti-kêr, forzh petra a c'houlennomp. »

Ti-kêr Treveneuc n'en deus ket respontet d'hon goulennoù, na perc'henned an ti.

Anavezet eo ar gudenn, evel ma tispleg deomp Gwendal Vasseur⁶, bet renezh departamant an tiriadoù hag ar mor e Rannvro Breizh, hag arbennigourez war Lezenn an Aodoù, nevez zo war he leve, « *diouer a dud a vez o labourat e servijoù ar prefetioù* ». Kefridi all ouzhpenn a vez gant ar skipailhoù gouestlet da wiriañ al lezennegezh – da lâret eo gwiriañ m'eo reizh an aktoù bet kemeret gant ar strollegezhioù lec'hel hag o ensavadurioù publik e-skoaz an diferadurioù lezennel a dalvez.

« *Peurliesañ ne vez ket ouzhpenn pemp den lakaet da bleidiñ gant kontroll lezennegezh ar c'hêriekaat, ha nebeutoc'h*

« Da vareoù zo n'int nemet un pe zaou den evit kontrolliñ an holl aktoù ! »

a-wechoù. Da vareoù zo n'int nemet un pe zaou evit kontrolliñ an holl aktoù ! », eme Gwendal Vasseur. Pa ouzer e rank ar c'hontrolloù-se bezañ kaset dindan daou viz.

Padal e vez ar prefetioù o tegemer etre 25.000 ha 30.000 akt pe teul e-liamm gant ar c'hêriekaat bep bloaz. E-barzh ur Sintezenn eus an holl evezhiadennoù bet embannet da geñver kontroll ar c'halite bet embannet e miz Kerzu 2020⁷, e veneg prefeti Penn-ar-Bed e vefe tro 28.320 akt kêriekaat ar bloaz. En o zouez 11.507 a zo bet kontrollet ar bloavezh-se (war-dro 41 %), pezh en deus roet tro da 190 rekour dre youl gaer, ha da 49 lizher evezhiadennoù, an darn vras anezho evit lâret ez eo re soubl an doare m'eo bet implijet Lezenn an Aodoù.

6] Cheñchet eo bet an añv evit gwareziñ dizanv an den

7] « synthèse des principales observations formulées au titre du contrôle de légalité », renezh ar geodadelezh hag ar lezennegezh, Ofis kontroll al lezennegezh, prefeti Pen-ar-Bed, d'an 10 a viz Kerzu 2020



Un dachenn a vez implijet evel parklec'h e-pad an hañv e Plomodiern, e 2022. Al lodenn izelañ a zo e-barzh an takad 100 metrad ha n'eus ket tu da sevel tier. El lodenn uhelañ e vo ur villa gant ur poull-neuiial.

« Berr-tre eo daou viz evit gellet studiañ un akt, dastum an elfennoù a-bouez, sevel un teuliad ha lakaat anezhañ da vont en-dro, eme an arbennigourez ivez. Ouzhpenn da-se ez eus bet goulennoù e-leizh abaoe enkadenn ar C'hovid, ha n'eo ket aet niver an dud da heul. N'eus ket atav arbennigourien an danvez eus kargidi ar servijoù. Gellet a reont gwechoù zo goulenenn skoazell arbennigourien an DDTM – met aze e kemer amzer ivez c'hoazh. »
Ha pa vez ganto amzer da bleidiñ gant kontroll lezennegezh un akt pe un

« Gwechall e veze disfiz ral a wech ar brefeded en erbedadennoù o servijoù. »

teul, roll ar servijoù a bled ganto ne ya ket pelloc'h eget strollañ ar reoliadurioù, sevel teuliadoù ha skrivañ erbedadennoù.

« Ar brefeded eo a sin ar galvoù da ziwall pe an adkasoù da soñj deuet diwar kontroll al lezennegezh, pa vez eus outo, eme c'hoazh Gwendal Vasseur, hag erbedadennoù ar servijoù n'int ket bepred heuliet gant ar brefeded. Aet eo an traoù kalz war-raok abaoe ugent pe tregont vloaz : gwechall e veze fiziañs gant ar brefeded en o servijoù ha ral a wech e veze disfiz en o erbedadennoù.

N'eo ket tamm ebet an traoù evel-se hiriv an deiz. »

Ha kement-mañ evit brasañ displejadur kargidi ar prefetioù, gwall nec'het pa welont eo bet laosket a-gostez darn vras o evezhiadennoù el lizher ofisiel, enno « *pennadoù a-bezh bet di-verket* », emezi ouzhpenn.

Ar memes tra tamm-pe-damm evit an teulioù kêraozañ (Scot pe PLU), ha memes m'eo bet servijoù ar prefeti hag an DDTM o kemer perzh er sevel teuliad peurvuiñ, anavezet eo gant an dilennidi an diferadennoù bet lakaet war-raok. Pezh ne dalvez ket e vint kemeret e kont.

WAR ENEZ BERDER UN OTEL CHEUC'H WAR UN TAKAD RUMMATAET

Kemeromp afer Giboire war enez Berder (56). Ul lec'h da vont da bourmen eo an takad glas-se e-kreiz ar Mor-Bihan, hag aes da vont di war e dreid pa vez izel an tre. Eno e veze savadurioù eus an XIX^{vet} kantved. Michel Giboire, perc'henn an enez abaoe 2013, a oa da neuze prezidant ar strollad embregerezhioù Giboire, en doa bet digant ar prefed un aotre annezañ dibad (AOT) war an domani

Enez Berder : Meur a wech e oa bet de- sachet evezh ar maer hag e guzul-kêr.

foran mor evit obererezhioù « *obere-rezhioù e-liamm gant ar mor* » — un nemedenn da Lezenn an Aodoù a oa bet soñjet evit reiñ lañs d'an ekonomiezh e-liamm gant metoù ar mor.

Etre miz Gouere 2017 ha deroù 2018 eo bet lakaet kempenn an daou savadur gant M. Giboire, hep tamm aotre kêraozañ : kemmet e oa bet dorioù ha prinistri ar peskerezh kozh, kempennet an diabarzh ha krouet siminalioù evit ma vefe troet da lec'h annez. Hag abaoe ez eo deuet e berc'henn da dremen e amzer eno, deuet eo neuze da vezañ e lojeiz⁸. Difennet eo gant Lezenn an Aodoù koulskoude seurt

8] Arrêté du 10 novembre 2016 définissant les destinations et sous-destinations de constructions pouvant être réglementées par le règlement national d'urbanisme et les règlements des plans locaux d'urbanisme ou les documents en tenant lieu, lec'hienn Legifrance, pajenn internet bet gwellet e miz Even 2025

« Prefeded zo n'eus nemet taolioù da bakañ gant an istorioù kêrieakaat. »

cheñchamant kefridi en ur savadur en takad a 100 metrad⁹. Diouzh ar mor. E-kreiz an enezenn e kaver ivez ur maner.

SLK (pe PLU) ar gumun a oa bet degeret e 2018 en doa raktreset e vefe bet troet anezhañ un ul leti chik ha cheuc'h gant an embregerezh Giboire — un aotre hag a greskfe eus 30 % ar gorread savadurioù warnañ. Dirak kement a torroù-lezenn sklaer eo bet taget ar raktres hag an SLK gant peder c'hevredigezh gwarez an endro — hag aet ar maout ganto (barnadenn da vat abaoe diviz ar c'huzul Stad d'an 10 a viz Du 2023). Lakaet da ehanañ raktres ar strollad Giboire. Evit poent bepred. Meur a wech e oa bet desachet evezh ar maer hag e guzul-kêr koulskoude.

« Sevel ur Scot pe ur PLU a c'hell tapout meur a vloaz, a zispleg deomp Gwendal Vasseur, betek 10 vloaz a-wechoù. Ret eo d'an dilennidi en em lakaat a-du, met gellet a ra ivez servijoù ar Stad lakaat o fri ennañ, ha kargidi an DDTM a c'hell bezañ pedet pe dont drezo o-unan en emvodoù prientiñ. Evit pezh a sell afer Giboire e oa bet kargidi an DDTM o sachañ evezh ar maer adalek ar bazenn gentañ diwar-benn breskted lezennel degaset gant takadiñ enez Berder hag ar riskloù war ar raktres leti evel ma oa soñjet.

Met ar maer n'en deus ket fellet dezhañ klevet. »

N'eo ket gant se ez eo echu an afer : « ur wech m'eo degemeret ar raktres Scot pe PLU, e vez embannet un ali gant ar Stad, dileuriet aze gant ar servijoù prefeti, hag e anv un den publik kevelet. Aze e oa niverus an dud c'hoazh o lakaat war-wel kudenn Berder, a ouzhpenn Gwendal Vasseur. Da heul e oa bet un enklask publik, lec'h ma oa bet goulennet digant an holl da lâret o soñj, hag ar geodedourien dreist-holl. Pedet e oa bet an dilennidi da reiñ ur respont da bep evezhiadenn, pe e vefent digant an dud publik kevelet pe digant tud ar vro. Ur wech echu gant an enklask e teu ur c'homiser enklasker d'ober ur sintezenn ha da embann e soñj d'e dro. »

9] Lez-varn galv velestradurel Marsilha, kambur kentañ, - formation à 3, 20/11/2009, 07MA03857, Diembannet e-barzh an dastumad Lebon, lec'hienn Legifrance, pajenn internet bet gwellet e miz Even 2025



Vassil Feodoroff

War drezenn Beg Meil e Fouenant e oa bet troc'het hent an aod gant un ti. Ur gevredigezh lec'hel zo deuet a-benn e vefe moaien tremen en dro gant ar GR34.

En degouezh-mañ e oa bet ar gomi-serez enklaskerez evit SLK an Arvor-Baden oc'h ober fed « e oa diaes a-walc'h lakaat savadurioù Berder e renk ur gêriadenn pe e renk un takad kêriekaet stank a-walc'h, ha neuze ne oa ket a zigarez da rummañ anezho e takad U ». Ha da embann un ali a-du gant ar raktres SLK, met war-vete gouzout e oa ret gwareziñ Berder ha mirout anezhi evel takad heverk. Met daoust da-se n'eus ket fellet d'ar maer kemm e raktres. N'en deus ket bet c'hoant reiñ deomp resisadurioù deomp daoust d'hor goulennoù.

Forzh penaos ne oa ket ret dezhañ hen ober. Memestra gant Pascal Puisay, aotrou maer (Horizons) e Pennestin (56) a chom ar gwir gantañ embann, evel m'en deus bet graet e miz Gouere 2024 war lec'hienn an ti-kêr, e fell dezhañ « kadarnaat dibaboù politikel ar raktres evel m'eo bet divizet » evit an SLK/PLU, daoust da ali kontrol bet embannet gant ar c'homisered-enklaskerien d'ar 26 a viz Even 2024, ha daoust da ziferadennoù ar prefed ha re tud publik all kevelet.

En e ali, an MRAE, Mision Rannvroel Aotrouniezh an Endro, a lak war-wel

an diouer a gempoell etre ar raktres SLK hag an tiriad e gwir¹⁰, ha dre vras en deus keuz o welet un hentenn pri-ziañ an endro ne ya ket betek penn, « *abalamour d'un diouer a raktres demografek kempoell, d'un diouer a bri-ziañ an ezhommoù lojeiz, ha dre ma n'eo ket bet dielfennet kenfeurelezh ar c'hizidigezhioù war an endro, hag an dalc'hioù e kont, war an tachennoù lec'h ma oa raktreset un astenn kêriekaot dreist-holl* ».

Padal ez eo ar c'huzul-kêr a-bezh en deus votet a-du gant an SLK. Daou viz a oa evit servijoù kêraozouriezh ar prefeti evit gwirañ ma oa diouzh lezenn, evel evit forzh peseurt aotre sevel ti. Ha dres evel evit un aotre sevel ti e c'hell ar prefed heuliañ erbedadennoù e servijoù, ha disfiziout an SLK, pe treuzkas anezhañ d'al lez-varn melestradurel.... pe get ! « *Met ral a wech e vez kaset un SLK d'al lez-varn, eme Gwendal Vasseur. N'em eus gwellet se nemet ur wech e-doug ma buhez micherel.* » Ur sifr souezhus pa gemerer amzer da sellet pizh ouzh SLK an 263 kumun a gaver en Arvor.

EIZH KUMUN EUS AN ARVOR HA N'O DEUS KET A STEUÑV LEC'HEL KÊRIEKAAT C'HOAZH

Klasket hon eus kemer harp war gement teul a oa da gaout (en o zouez al Levrig Lezenn an Aodoù¹¹ ken priziuz,

bet embannet gant Rannvro Breizh), ha lennet hon Lezenn an Aodoù eus en ur glask chom neptu, hag hon eus gellet jediñ e oa dre vras 87 kumun eus Rannvro Breizh a ziskoueze kaout peadra da sevel bec'h.

Evit 54 kumun all e oa niverusoc'h c'hoazh ha liesseurt o gwanderioù lezennel, (termeniñ ar c'hêriadennoù, kudennoù takadiñ, troc'hoù kêriekaot aet da get, tresoù souezhus an takadoù tost ouzh ar mor, ha kement zo...). Diamzeret eo un tregont ben-nak outo, da lâret eo ez int re gozh ha zoken ma 'z int bet hizivaet, n'eo ket bet trawalc'h evit derc'hel kont eus an diferadurioù lezennel diwezhañ.

A-benn ar fin, ma 'z eo ur redi lezennel abaoe 2000 kaout un SLK, eizh kumun eus an Arvor n'o deus hini ebet c'hoazh en deiz ma embannomp an teuliad-mañ (lod abalamour m'eo bet nullet gant al lez-varn, evel Fouenant : Sant-Pêr Poualed, Ploveur, Trebabu, Menez-Dol, Fouenant, Tregarvan, Enez Sun hag Enez Eusa.

Evit pezh a sell ouzh afer Giboire, ar prefed n'eus ket graet mann, daoust d'an holl evezhiadennoù bet graet gant an dud publik kevelet, an DDTM, ar c'hevredigezhioù, ha kement zo. Evit Laurent Le Clech, arbennigour war gwir ar c'hêriekaot war an aod : « *Ar brefeded n'eus nemet taolioù da bakañ gant an istorioù kêriekaot. Aliesmat ne welont interest ebet nag evito*

10] Ali Mision Rannvroel Aotrouniezh an Endro diwar-benn raktres Larmor-Baden (56) SLK, Mision Rannvroel Aotrouniezh an Endro, 12 a viz Here 2017

11] « Référentiel loi littoral », levrennig 1, prefeti Rannvro Breizh, miz Genver 2024

AN DIV DREDERENN EUS KUMUNIOÙ ARVOR BREIZH O DEUS UR PLU DOUETUS



- Kumunioù gant ur PLU mat (85)
- Kumunioù gant ur PLU gant traoù da dabutal (87)
- Kumunioù gant ur PLU gant breskted justis (54)
- Kumunioù gant ur PLU ha n'eo ket mat ken (30)
- Kumunioù hep PLU (8)

nag evit o hent micherel gant an aferioù kêraozañ-se. Setu perak e c'hellont gwechoù zo chom hep heuliañ erbedadennoù o servijoù, ha chom hep mirout ouzh ar raktresoù-se da vont betek penn. Merzhet ez eus bet alies-mat ne grogont en aferioù nemet pa ouzont emaint war-nes mont kuit evit tapout ur post gwelloc'h. »

Hervez Gwendal Vasseur, gwelloc'h e kav ar brefeded la-kaat an ekonomiezh

da gentañ kentoc'h eget forzh petra all, ha ne glaskont ket mirout ouzh ur raktres a c'hellfe krouiñ charre hag implijoù war un tiriad. Evel, da skouer ar raktres terkañ industriel war porzh Sant-Kast-ar-Gwildoù (22), bet nullet gant ar justis da heul ur rikour digant Kevredad kevredigezhioù gwarez an endro hag an arvor

en Aodoù-an-Arvor (Fapel 22). Sur a-walc'h eo bet kendrec'het ar prefed da lezel a-gostez ar fed ma oa er-maez lezenn dre ma oa bet lakaet da soñjal e vefe bet 140 implij da gaout.

Gwashoc'h c'hoazh, ar c'homzoù bet distaget gant prefeded zo a glaske bihanaat an dalc'hoù ekologel, hag a zo bet klevet gant hon test : « Klevet 'meus bet unan o lâret nevez zo, diwar-benn krignerezh an aodoù da skouer :

« Ur bern prefeded a glask bihanaat an dalc'hoù ekologel. »

'amzer zo, an dra-se a vo ur gudenn evit hor bugale-bihan'. Unan all o kadarnaat 'ne blijte ket dezhañ an takadoù heverk' ha ne rae forzh eus o gwarez - padal ez eo pinvidigezh an tiriadoù an takadoù heverk-se. War veur a dachenn eo n'hell ket ar brefeded nac'hañ ur raktres ekonomikel, ar spi ganto e vo graet al labour gwiriañ lezennegezh en o flas. N'eo ket

koulskoude d'ar re-se d'ober, ha n'o deus ket peadra alies-mat ! Ha ne stag ket ar brefeded ouzh o oberoù el lezioù-barn. » E-doug hon enklask hon deus bet savet goulennoù ouzh un toullad mat a zilennidi. N'eus bet roet respont deomp gant kazi hini ebet. Warbouez Laurence Fortin, bez-prezidantez Rannvro Breizh e-karg eus an tiriadoù, an ekonomiezh hag

an annezioù, hag he deus anzavet deomp : « *gwechoù zo e vez ar brefeded oc'h ober muioc'h a bolitikerezh eget ar bolitikourien* ». Evit pezh a sell ouzh prefetioù Breizh, hini ebet en deus bet roet e asant evit respont ouzhomp, na kaset deomp respontoù ouzh hor goulennoù dre skrid.

Jérémie Szpirglas ha Denis Vannier

LEZENN ARTIFISIELAAT EBET RIK : A-BOAN BET VOTET, DIJA BET FRAILHET

Gellet a ra ar « maered-saverien » an Arvor bezañ disammet : al lezenn a oa sañset lakaat un termen d’an artifisielaat tachennoù zo bet skoet gant meur a zisdalc’h ha meur a c’houlenn reizhañ a-berzh ar gouarnamant ha kannaded zo. E-touez an disammoù bet divizet : ar savadurioù labour-douar, p’emaint koulskoude abegoù pennañ an artifisielaat tachennoù e Bro-Leon.



- 】 Ne bled ket lezenn ar Artifisielaat Ebet Rik (AER) gant ar savadurioù labour-douar.
- 】 E kumunioù zo, e Penn-ar-Bed paneveken, ez eo al labour-douar abeg pennañ an artifisielaat tachennoù koulskoude.
- 】 Deuet eo ar reol dibar-se diwar al lobiañ a-berzh dilennidi ar vro hag an aozadurioù labour-douar.

Erru eo dibenn marevezh laouen ar c'hêriekaot koulskoude. Echu e vo e 2050 er Frañs. A-benn 26 vloaz ne vo ket lonket tachennoù labour-douar ha naturel ken evit ma vefe savadurioù, hentoù pe parklec'hioù warno. War-bouez ma vefe rentet d'an natur douaroù bet betonet dija. Setu aze pezh a c'houlenner digant an AER¹, pe Artifijsielaat Ebet Rik, ur bennaenn bet degemeret el lezenn « Hin ha Dalc'husted ».

Lezenn an Aodoù a glaske dija mirout mui pe vui ouzh « pikouzañ » ar maezioù e kumunioù an Arvor. Gant an AER e vo gwarezetoc'h ar c'humunioù diouzh tagadennoù ar saverien tiez. Hag abaoe penn-kentañ ar bloaz e c'hell ur gumun nac'hañ un aotre sevel ti war un dachenn sevel ti ma ya a-enep d'ar pal digreskiñ an artifijsielaat. Abaoe m'eo bet degemeret e 2021 koulskoude, kannaded ha ministred o deus skañvaet a-galz doareoù lakaat al lezenn e pleustr. Ha pa oa erru Michel Barnier e oa distignet ar redioù c'hoazh. En e zisklêridur politikerezh hollek², bet distaget d'ar 1añ a viz Here e oa bet embannet gant ar c'hentañ ministr bet e felle dezhañ « *lakaat da vont war-raok en ur mod pragmatek ha disheñvel reoliadur an Artifijsielaat Ebet*

Rik, evit ma c'hellfe talañ ouzh ezhommoù pennañ an industriezh hag al lojeiz ». Kement ha reiñ da c'houzout d'an dilennidi a-enep ar « sobrentez font ». Met pezh a c'hellfe lakaat en arvar ar c'henasant bresk a gaver e Breizh war an teul-se. Evit poent, ministr kentañ nevez François Bayrou n'en deus ket komzet eus an afer-se.

Sañset e vefe bet an holl strollegezhioù a Vreizh engouestlet en digreskiñ o ezhommoù font ac'hann d'ar bloaz 2050, hag en em glevet int war an dasparzh strivoù zoken. An emglev-se zo bet paket gant Rannvro Breizh en doa lakaet an AER en e raktres rannvroel terkañ an tiriadoù (Sraddet)³.

Ha setu Breizh gant penn-kentañ e reol-voued, an hini a ya betek 2031 : digreskiñ diouzh an hanter al lonkañ tachennoù labour-douar ha naturel e-skoaz ar prantad 2011-2021. War hollad Rannvro Breizh ez eo 14.310 hektar hag a vefe bet lonket didan dek vloaz, hervez ar bilañs bet savet gant ajañsoù kêraozouriezh e Breizh er Mod da Implij an Douaroù (MID/MOS). Goude un nebeud reizhadennoù e c'heller lakaat da 6.665 hektar sifr hollad an douaroù gouestlet d'ar c'hêriekaot.

Evit mirout ouzh pep direizhded ez eus bet staliet kriterioù ingalañ

1] « Artificialisation des sols », pennad eus lec'hienn ministrerezh an Treuzkemm ekologel, d'an 12 a viz Ebrel 2024, pajenn internet bet gwellet e miz Even 2025

2] « Les propositions de Michel Barnier sur le logement privilégient le marché aux dépens des personnes mal logées », pennad skrivet gant Yoann Sportouch, Le Monde, 9 a viz Here 2024

3] Brastres rannvroel evit an terkañ, an diorren padus ha kevatalder an tiriadoù (BRTDPKT), rannvro Breizh, 17 a viz Ebrel 2024

studiet-mat⁴. Ur preder war ar reizhded seul souezhusoc’h ma ‘z eus bet disoñjet un dra a-bouez bras en holl jedadennoù : ar savadurioù labour-douar ha n’int ket kemeret e kont gant an AER betek 2031, hervez un dekred ministerel⁵.

ABEG PENNAÑ AN ARTIFISIELAAT E KUMUNIOÙ ZO

Dre m’eo gwareziñ an tachennoù labour-douar ha naturel pal an AER, al labour-douar ne zlefe ket bezañ un dañjer evit an douaroù, er c’hontrol eus an industriezh, ar servijoù publik pe an annezioù. An tiez-gwer, evel ar c’hrevier a zo perzh eus artifisielaat an douaroù. An abeg pennañ e kumunioù zo zoken.

Pa ne seller nemet war gumunioù an Arvor e Rannvro Breizhezeus bet artifisialaet 266 hektar a zouaroù gant al labour-douar etre 2011 ha 2021 (Diwar sifroù an MOS). Ur bilañs a-bouez pa geñverier anezhañ gant hini an industriezh hag ar servijoù lakaet asambles : 372 hektar. Eeunaet e oa bet Lezenn an Aodoù e 1999, goude-se e 2018, just a-walc’h evit gellet lakaat sevel

savadurioù a oa ezhomm gant al labour-douar er-maez eus an takadoù bet kêriekaet dija (nemet en takadoù re dost d’an aod).

E kumunioù zo e talvez e ar savadurioù-se un drederenn, ha betek an hanter eus an artifisielaat etre 2011 ha 2021, hervez ar MOS (Ar Vinic’hi, Plougin, Pleudehen, Gwiver, Pleurestud, Plougouven, Sant-Varzhin-war-ar-maez Planiel, Landaol, Hezoù, Plouilio, Plonevez-Forzhe).

Aet eo ar brasañ niver a zouaroù lonket gant kumun Katell-Paol, gant 20 hektar a savadurioù labour-douar

« E kumun Katell-Paol, Rance, an hanter eus hollad ar savadurioù bet savet abaoe 10 vloaz a zo savadurioù labour-douar »

bet savet dindan 10 vloaz, pezh a ra an hanter eus hollad ar savadurioù nevez war ar prantad-se.

Savet e oa bet an darn vras anezho war-goust dakadoù labour-douar. Met

ul lodenn anezho (18 %) a grog ivez war dachennoù naturel ha koadoù. 47 hektar eo d’an nebeutañ a dakadoù naturel zo bet goloet gant savadurioù labour-douar e kumunioù an Arvor e-doug an dek vloaz 2011-2021.

Erru eo diamzeriet dija ar bilañs-se. Kendalc’het ez eus bet gant an artifisielaat tachennoù labour-douar

4] « Première modification du Sradet Bretagne : territorialisation du Zéro artificialisation nette (ZAN) », rannvro Breizh, 7 a viz Here 2023

5] « Décret n° 2023-1097 du 27 novembre 2023 relatif à la mise en œuvre de la territorialisation des objectifs de gestion économe de l’espace et de lutte contre l’artificialisation des sols », Journal officiel n°0275, 28 a viz Du 2023



DR

Ur bern tiez gwer zo bet savet e Bro Pempoull ar loavezhioù tremenet.

abaoe 2021, ha kenderc'hel a raio er bloavezhioù da zont c'hoazh. Gellet en deus skipailh *Splann !* resisaat piv a denno ar muiañ a vad dioutañ hag e pelec'h, a-drugarez da zielfennadur hollad an aotreoù sevel tiez bet derot nevez zo gant tiez-kêr an Arvor (dindan 5 km eus an oad).

Gellet hon eus kelc'hiañ an aotreoù sevel ti bet deroet abaoe miz Genver 2020 (talvoudus c'hoazh) war dakadoù ha n'eus ket bet savet tiez warno e dibenn 2023. Pezh a ra tro 7.000 aotre, hag ar savadurioù warno a raio betek 197 hektar war hollad an aodoù e Breizh 5 departamant. Ul lodenn vat a ya gant al labour-douar : war-dro tro 43 hektar a savadurioù nevez, da lâret eo ur bempvedenn eus hollad ar savadurioù da zont. Chom a ra darn vras ar raktresoù (90 % eus ar gorread) en

tu all eus ur Penn-ar-Bedc'hilometr diouzh an aod.

PENN-AR-BED, KREIZENN AR SAVADURIOÙ LABOUR-DOUAR

War aodoù Bro-Leon emañ ar greizenn, lec'h ma kaver ouzhpenn an hanter eus gorread ar savadurioù micherel nevez savet (60,5 %) er pevar bloaz diwezhañ o vezañ savadurioù labour-douar.

E Trelaouenan, Plouenan, Plougouloum, Kleder, Kastell-Paol, Mespaul ha Ploueskad e kaver ar raktresoù al ledanañ. Er seizh kumun-se eus Gorre Leon ez e kaver an holl savadurioù labour-douar nevez aotreet abaoe 2020, en ur c'holoñ en tu all da 185.000 m². Kement hag un ugent bennak a dachennoù melldroad. Tiez-gwer legumajerien dreist-holl.

Er penn-kentañ eus an direoliadur-se : al lobiañ gant dilennidi ar vro hag an aozadurioù labour-douar. Yannick Haury, bet kannad (Renaissance) bro-Raez en doa bet lakaet ar gaoz er Vodadenn Vroadel e miz Ebrel 2023⁶. Nebeut a-raok ma vefe bet studiet al lezenn war an doareoù lakaat an AER e pleustr e oa bet Kambreier al Labour-douar o pouezañ c'hoazh. « *Diwar-benn ar savadurioù labour-douar, pezh a gin-nig Kambreier Labour-douar Frañs ez eo ma ne vefent ket kemeret e kont er jediñ an takadoù artifiñsielaat war bep kumun, met war al live broadel kentoc'h. Setu pezh a oa skrivet en ur gemennadenn eus an 9 a viz Even 2023⁷. Savadurioù a laz hollek int, talvoudus evit an holl, labourerien-douar yaouank pe mad al loened.* »

Efedus eo bet o c'houlzad pa 'z eus bet fiziet 8 amandamant d'ar Vodadenn evit lâret ar memes tra tamm-pe-damm. Ha ma n'eo ket bet skrivet e-barzh al lezenn, d'an nebeutañ eo bet kadarnaet un nebeud mizioù diwezhatoc'h, ha betek 2031, dre un dekred⁸ eus ar 27 a viz Du 2023 e oa nemedennoù eus ar savadurioù labour-douar : « *Evit koulzad kentañ dek vloaz (2021-2031), ar savadurioù pe*

staliadurioù evit bed al labour-douar, hag a saver war dachennoù labour-douar pe naturel ne lakaont ket da greskiñ lodenn an takadoù kêriekaet, ha ne lonkont ket an takadoù-se. »

N'eo ket feuket Laurence Fortin, bez-prezidantez tiriadoù ekonomiezh hag annezioù e Rannvro Breizh gant an nemedenn-se, evel pa veneg « *sou-vereniezh ar boued* » a ya un tamm mat pelloc'h eget harzoù ar gumun. Gant ar guzulierez rannvro e vez soutener ul lakaat e pleustr an AER war veur a live, o tagañ da gent « *an annezioù a zo kiriek eus 70 % eus an artifiñsielaat, evit gellet mirout plas d'an obererezhioù ekonomikel. Abalamour ma rannomp ar font dre an hanter evit an obererezhioù ekonomikel, sur e teuio Breizh da vezañ un Ehpad* ».

Ma ya an AER pelloc'h eget ar gouarnamant Barnier, e vo ret chom da eeunaat hollad an teuliadoù kêriekaet (Scots, ha goude-se PLUi) war palioù sifret ar Rannvro. Gellet a rafe mont betek 2028... Da c'hortoz, war an dachenn, pep strollegezh a c'hell kenderc'hel da lakaat e pleustr reolennoù ar bed betek-henn.

Jérémie Szpirglas ha Denis Vannier

6] « Question orale n° 317 : Zéro artificialisation nette et serres agricoles », *Journal officiel*, 25 a viz Ebrel 2023

7] « Zéro artificialisation nette, la trajectoire doit être maintenue pour préserver les terres agricoles », kemennadenn d'ar gazetennerien, kambroù al labour-douar Frañs, 9 a viz Even 2023

8] « Décret n° 2023-1097 du 27 novembre 2023 relatif à la mise en œuvre de la territorialisation des objectifs de gestion économe de l'espace et de lutte contre l'artificialisation des sols », *Journal officiel* n°0275, 28 a viz Du 2023

Pinvidigezh divent da gaout diwar douaroù da sevel tiez

Pa zielfenner dek bloavezh a varc'hadoù font e Breizh e weler penaos eo deuet an artifijselaat an douaroù naturel pe labouret da vezañ un dalc'h ekonomikel a zegas gounidoù bras divent. Re uhel an temptadur evit herzel ouzh emled ar betoñs ?

Talvoudegezh un douar naturel (evel termenet en teuliadoù font...) a c'hellfe bezañ priziet da gentañ-penn diouzh pinvidigezh ar vev-liesseurted a vez ennañ, pe diouzh ar varregezh gounidegezh a zo ennañ, evit

pezh a sell ouzh an douaroù labour. Met ne ya ket er-maez diouzh lezenn sav-diskenn ar marc'had. Gellet a ra priz an douaroù « naturel » mont eus 1 da 100... ma c'heller sevel ti warno. Pa seller pizh ouzh ar c'hemm-se e c'heller priziañ pegen kreñv ar wask war an douaroù klask warno. Dielfennet hon eus neuze priz gwerzh tachennoù hep tamm ti warno, bet enrollet etre 2014 ha 2023 en diaz DVF (goulenn talvoudegezh ar font).

Kemeromp 1 m² a zouarou en ur gumun eus an Argoad. Tro 50 santim e oa keidenn e briz en dek vloaz diwezhañ. Div wech ar priz-se er c'humunioù war an aod. Seul dostoc'h eus an aod, seul uheloc'h e briz dre vras, evit tizhout ouzhpenn 4 euro ar m². Digreskiñ a ra goude-se a-galz, met ne ya ket en tu all d' 1 euro ar m² evit an tachennoù dindan 100 metrad diouzh an aod, an takadoù gwarezet ar gwellañ gant lezenn an aodoù, lec'h m'eo erru dibosupl lakaat sevel ti.

En 10 vloaz diwezhañ ez eus bet tapet tro 977 milion a euroioù d'an nebeutañ gant ar werzherien douaroù naturel war an aodoù, pezh a ra un drederenn eus ar werzh douaroù evel-se war Vreizh a-bezh.

Kresket eo a-galz niver ar gwerzhioù/prenadennoù tachennoù tost ouzh ar mor, buanoc'h eget lec'hioù all e Breizh, o tremen eus dindan 2.000 ar bloaz 10 vloaz zo da war-dro 3.000 en tri bloaz tremenet. Kresket eo kement-all



E melen, douaroù naturel pe labour-douar bet gwerzhet ouzhpenn €100/m², etre 2014 ha 2024.


hollad an douaroù naturel bet gwerzhet (eus 260 da 370 hektar). Padal eo ouzhpenn daougementet ar sammadoù : e 2022, eo erru en tu all da 150 milion a euroioù ar prenaadennoù douaroù naturel ze c’humunioù war an aodoù (250 milion e peurrest Breizh).

Ul lamm spontus en deus graet e 2020 keidenn priz ar m² en takadoù war an aod etre 500 metr hag ur c’hilometr eus ar mor : tremenet eo eus dindan 2 € da tro-dro da 8 € ar m². Diwar vremañ ez eo etre 200 metr hag ur c’hilometr eus ar mor e kaver an takadoù kerañ war an aodoù. Keidenn priz ar metrad karrez a zo div pe deir gwech keroc’h eget e-tal ar mor pe en douaroù. An takadoù-se eo a ginnig ar gwellañ treuzvarc’had etre bezañ tost eus ar mor hag ar chañsoù da gaout un aotre sevel tiez. Risklus eo deuet da vezañ klask sevel un ti tostoc’h eus ar mor : un tamm mat strishoc’h al lezenn e takadoù dindan 100 metrad pe en takadoù « tachennoù tost diouzh ar mor » pe « ken-gwelus », hag a c’hell mont, hervez lec’hioù zo, un tamm mat pelloc’h eget ar 100 metrad (en tu all d’ur c’hilometr zoken).

Abaoe 2014 eo tost da 200 tachenn naturel eus Breizh zo bet gwerzhet da brizioù uhel-tre o tizhout 500 euro ar m² d’an nebeutañ. Ouzhpenn an hanter anezho a gaver en ur gumun eus an Arvor, ha dreist-holl war an takad etre 200 ha 1.000 metrad diouzh ar mor. Ha dreist-holl tro-dro d’ar Mor Bihan.

PRIZ AN DOUAROÙ NATUREL HERVEZ PEGENT TOST INT D'AN AOD

Priz kreiz eus ar werzhoù e-tre 2014 ha 2023 hervez lec'h an douaroù





Lakit hoc'h anv a-benn degemer al lizher-kelaouiñ !

Dedennet oc'h gant ar pezh a c'hoarvez er vro ? Gant an endro hag al labour-douar ? C'hoant 'peus bezañ titouret pa 'vez embannet un enklask gant *Splann!*? Gall a reoc'h heuliañ ha souten ac'hanomp en ur lakaat hoc'h anv a-benn degemer hol lizher-kelaouiñ bep miz war www.splann.org

Klevet 'peus kaoz eus Splann ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro-Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Erruet eo *Splann !* d'ur mare eo diaesoc'h diaesañ ar jeu evit ar gazetennerien. E Breizh, ouzhpenn 500 kazetenner o doa sinet ul lizher digor kaset d'ar rannvro e 2020 : ganto e oa bet embannet sklaer ez eus diaezamantoù bras evit titouriñ mat an dud diwar-benn industriezh gounez-vouedel ar vro. Kement se a zo, evel-just, chalus-tre evit ar geodedourien. Soutenet eo bet al lizher-mañ gant 50.000 a dud.

Kazetennerien 'vez paeet gant *Splann !* a-benn kas enklaskoù don war an hir-dermen. Pep tra a-drugarez d'ar re a harp ar gevredigezh. Embannet e vezont digoust war he lec'hien ha gant mediaoù a genlabour gant *Splann !*

Ur media dizalc'h...

Muioc'h mui e teu da vezañ mediaoù gall e daouarn tiez-bank hag embregerezhioù bras. Ar c'hontrol-mik a vez graet gant *Splann !* Arc'hantaouet e 'vez an enklaskoù gant ar geodedourien 'zo kizidik ouzh frankiz ar c'hazetenniñ.

Tost an holl arc'hant 'vez tapet gant *Splann !* 'zo bet roet gant an dud, en linenn pe dre chekenn. Gall a ra ivez bezañ arc'hantaouet gant kevredigezhioù all a zo kizidig ouzh frankiz ar c'hazetenniñ, pe gant yalc'hadoù 'zo. Met ne 'vez ket degemeret arc'hant na digant embregerezhioù, na digant strolladoù politikel, na yalc'hadoù digant strollegezhioù lec'hel. Gant *Splann !* 'neus ket na perc'henner pinvidik na bruderezh na kevranegerien (actionnaires, en galleg). Ur c'homite evezh a ra war-dro eus pelec'h e teu an arc'hant a-benn ne yafe ket a-enep karta embann *Splann !*

... hag a zifenn an enklaskoù war an hir amzer

Aet eo da vezañ primoc'h-primañ bed ar c'heleier. Ganeomp-ni 'vez difennet ur c'hazetenniñ war an hir-amzer a-benn lakaat ar gaoz war sujedoù kizidig e Breizh. O chom er vro emañ kazetennerien *Splann !* Eus Naoned betek ar Gerveur ha Lannuon e 'vez furchet ganeomp a-drugarez d'an titouroù kaset deomp hag hon labour bemdez.

Krediñ a reomp o 'deus ezhomm ar geodedourien eus enklaskoù don ha sirius a-benn ober o soñj dezho war ar bed. Un doare da reiñ ostilhoù a-benn kompren enkadenn sokial, an endro hag an demokratelezh.

Gwriziet mat eo *Splann !* E Breizh. Anat eo e 'vez soutenet ar brezhoneg a zegas pinvidikaez hag ur sell disheñvel en hol labour. An holl enklaskoù 'vez embannet en div yezh d'an nebeutañ.

Adkavit ac'hanomp war ar rouedadoù sokial :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

Ur stumm kevredigezhel

Splann ! 'zo ur gevredigezh lezenn 1901 hag eo dreist-holl dre dud a-youl vat ez a en-dro. En holl, 25 den ouzhpenn 'zo abaoe eo bet krouet *Splann !*, tro-dro da 15 anezho 'zo kazetennerien. Setu an dud a gemer perzh en emvodoù-meur hag o 'deus droet da votiñ. Klask a reomp e vefe ar muiañ demokratel posubl mont en-dro ar gevredigezh.

Gant ar c'huzul embann 'vez dibabet sujedoù an enklaskoù hag ar gazetennerien a vo o labourat warno. Gant ar c'huzul-se vez roet skoaz ouzh ar gazetennerien 'zo oc'h enklask. Mont a ra ivez en darempred gant ar mediaoù a embanno pe skigno ar pennadoù. Kazetennerien a-vicher indi ar re a gemer perzh er c'huzul-embann. Dilennet e vezont gant izili ar c'huzul-merañ hag, izili ar c'huzul-surentez.

Gant gazetennerien pijisted 'vez graet an enklaskoù 'zo bet dibabet gant ar c'huzul embann. Ober war-dro mont-endro *Splann !* a vez graet gant ar c'huzul-se. Pep dilennad a zo par d'ar re all a-fed puezha ha kargoù. Gant bodad-meur ar gevredigezh e vezont dilennet.

Lennit hon enklaskoù diwezhañ war splann.org

- *Breizh : c'hwezh an amoniak er maez*, Caroline Trouillet, miz Even 2021
- *Iberdrola. Pa vez louz ar jeu gant an energiezh « naet »*, Itzel Marie Diaz, Lena Lopes, miz Meurzh 2022
- *Metan : Bec'h d'an atant*, Julie Lallouët-Geffroy, Raphaël Baldos, miz Gwengolo 2022
- *Essure : drouk mouget e korf ar merc'hed*, Juliette Cabaço-Roger, Faustine Sternberg, Guy Pichard, Rozenn Le Carboulec, miz Here 2022
- *Moc'h fall*, Inès Léraud, Kristen Falc'hon, Floriane Louison, miz Gouere 2022
- *Brezel ar parkeier*, Julie Lallouët-Geffroy, miz Gwengolo 2023
- *Cooperl : enklask war un embregerezh pemoc'h ramzel*, Kristen Falc'hon, Ivan Logvenoff, miz Du 2023
- *Keuzioù ha girzhier en arvar*, Yann-Malo Kerbrat, Nolwenn Weiler, C'hwevrer 2024
- *Klañv eo porzh Sant-Nazer gant e industriezhioù*, Samy Archimède, Itzel Marie Diaz, Gwengolo 2024
- *Mengleuzioù pistrius e Breizh*, Célia Izoard, Morgan Large, Catherine Le Gall, miz Du 2024
- *Aodoù Breizh : temptadur ar betoñs en arvor*, Jérémie Szpirglas, Denis Vannier, miz Genver 2025
- *Ospitalioù publik : un distruj programmet, ur marc'had evit ar gennad prevez*, Isabelle Jarjaille, Caroline Trouillet, miz Gouere 2025

Ezhomm 'neus ac'hanoc'h Splann !



► A-benn goprañ kazetennerien, tresourien, fredoù-hent hag all 'neus ezhomm ac'hanoc'h *Splann* ! Evit poent eo bet arc'hantaouet hag embanet pevar enklask a-drugarez d'ho tonezonoù.

► M'ho 'peus c'hoant e vefe kendalc'het da vevañ ar c'hazetenniñ dizalc'h e Breizh, harpit ac'hanomp !

Gall a reoc'h reiñ el linenn war www.splann.org pe dre chekenn :
« *Da Splann !* » eo dav deoc'h skrivañ war ar chekenn ha kas anezhi da *Splann* !,
3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

Titouroù da gas deomp ?

Titouroù pouezus evit ar gevredigezh 'zo ganeoc'h ? Dokumantoù kizidig pe danvezioù e rankfe *Splann* ! enklask diwar o fennoù ? Kasit deomp ur postel kentañ gant ur chomlec'h hep hoc'h anv (gant un anv fals ma karit) a-benn displegañ deomp eus petra 'zo kaoz berr-ha-berr. Gwelloc'h eo implijout posteloù evel Protonmail. Respontet 'vo deoc'h penaos ober evit kenderc'hel an tabut ha kas deomp an dokumantoù.

Mont en darempred

contact@splann.org

Splann !, 3 plasenn Maez ar Roue, 22200 Gwengamp

***Splann* !**

Ti ar Vro
3, plasenn Maez ar Roue
22 200 Gwengamp

Penn renner an embann
Alain Goutal

Kazetennerien
Jérémie Szpirglas
Denis Vannier

Fotoioù

Vassili Feodoroff

Kartennoù

Denis Vannier

Bet heuliet gant

Juliette Cabaço-Roger

Difazhiet gant

Julie Lallouët-Geffroy
Caroline Trouillet

Laket brav gant

Anne Caillet-Leroy

Troidigezh

Stern Charbonneau

Adlennet gant alvokadez

Claire Simonin

Mouller Roudenn
ZI de Bellevue
BP 10129
22 201 Gwengamp

Menegoù lezenn :
3^e trimiziad 2025
ISSN: 2800-664X
Embanned e miz
Gwengolo 2025
Levrig n°9

